

645

YEZADUR AR BREZONEG KRENN

GANT

ABEOZEN



STERENN

Niv. 1. — IMRAM, barzoneg gant Maodez Glanndour.
— Priz : 10 lur.

Niv. 2. — AR GRILHETA E BREIZ, gant Farnachanavan. — Priz : 10 lur.

Niv. 3. — MAKBEZ, gant Shakespeare, troet gant Roparz Hemon. — Priz : 15-lur.

Niv. 4. — ENVORENNOU BEAJ, gant F. Vallée (eil levrenn). — Priz : 10 lur.

Niv. 5. — ENVORENNOU EUR BREZONEGOUR, gant F. Vallée. — Priz : 10 lur.

Niv. 6. — AR FARVEL GOAPAER, gant Paskal Keranveier. — Priz : 10 lur.

TAOLENN

	Pajenn
I. AMZERIOU AR BREZONEG	9
1. AR BREZONEG KOZ	9
2. AR BREZONEG KRENN	11
3. AR BREZONEG BREMAN	14
II. EUN DAMSKEUD EUS ISTOR HOR YEZ	17
4. EUS AN HENGELTIEG D'AR BREZONEG	17
KEMMADENNOU ER SONIOU	18
5. AMPRESTOU LATIN	22
VOGALENNOU A) <i>Berr</i>	23
B) <i>Hir</i>	24
C) DIOUVOGALENNOU LATIN	24
D) LAT. <i>w</i> ha <i>j</i>	25
E) LAT. <i>h, s, f</i>	25
F) KENSONENNOU TARZ-MOUEZIET	25
G) KENSONENNOU TARZ-DIVOUEZ	26
H) KENSONENNOU SONEK LATIN	28
6. KONTAMMADUR AR VOGALENNOU	29
7. AR POUEZ-MOUEZ	31
8. KEMMOU ER VOGALENNOU	32

9. KEMMOU ER C'HENSONENNOU	33
10. AR C'HEMMADURIOU DEROU-GER	36
III. YEZADUR AR BREZONEG KRENN	40
1. AL LIZERENNEG	40
1. AR VOGALENNOU	40
2. AN DIOUVOGALENNOU	40
3. KENSONENNOU	41
4. KEMMADURIOU DEROU	43
2. AR GER-MELL	43
3. AN ANO	45
1. NIVER	45
2. REIZ	48
3. DIVERADUR-GERIOU	48
4. AN ANO GWAN	50
1. NIVER HA REIZ	50
2. SKEUL AN DOAREA	51
5. AN NIVERI	53
6. AR RAGANOIOU	56
1. AR RAGANO-GOUR	56
1. <i>Furmou</i>	56
2. <i>Implij</i>	57
2. AR VERB KAOUT E BREZONEG	59
3. AN ARAOGENNOU DISPLEGET	61
4. AN DISKOEZA	62
5. AR GOULENNATA	63

6. AN AMRESIS	64
7. AR STAGA	67
7. AR GERIOU-NAC'HA	68
8. AR RANNIG KENTVERB	69
9. AR VERB	70
1. DISPLEGADUR PERSONEL : CARET	70
2. REIFF	71
3. BOUT	71
4. MONET	74
5. DONET	75
6. OBER	76
7. IMPLIJ AR VERBOU	77
10. AR RAKVERB	81
11. AN ARAOGENNOU	82
12. AR STAGELLOU	84
13. GWERZAOURIEZ AR BREZONEG-KRENN	85

ROLL AR BERRADURIOU

B.N.	Mister Santez Nonn.
J.	Burzud Bras Jezuz.
B.M.	Buhez Mabden.
B.B.	Mister Santez Barba.
C.	Catholicon.
Cat J.K.	Catechism Jili Kerampuil.
N.A.	Nouelou Ancien.
Gw.	An Dialog Etre Arzur ha Guynglaff.
Cr.	Credo 1456.
H.M.B.	Heuryou Brezoneg krenn.
P.B.	Barzonegou Brezonek krenn.
Q.R.	Quicquer Roscoff.
Gr.R.	Gregor a Rostren.
Chr. Br.	Chrestomathie Bretonne.
R.C.	Revue Celtique.

Notenn. — An niverennou a zeu war-lerc'h ar berradurioù a verk a-wechou ar bajenn, evit J. da skouer, a-wechou ar c'houblad, evel evit B.B. ha N.A., a-wechou ar werzenn, evel evit Gw.

Amzeriou ar brezoneg

Eur skourr ez eo ar Brezoneg eus ar Predeneg ha sede perak ez eo kar tost d'ar C'hembraeg ha d'ar C'herneveg. Bez' ez eus anezañ yez ar Vrezoned-se a zivroas eus Mervent Breiz-Veur d'an Aremorika er pempvet ha c'houec'hvet kantved, en abeg da alou-bidigez ar Saozon. Diou zivroadeg vras a voe : ar genta war dro 450, anezi tud daou-veuriad dreist holl, an *Dumnónii*, ar *Gornovii*, an eil, en eil rann ar c'houec'hvet kantved hag er seizvet. Chom a eure ar yez komzet gant ar Vretoned da veza heñvel ouz predeneg Breiz-Veur eur pennad amzer, nemet e savas buan a-walc'h kemmou etrezo. Degemer a reer da wir peurlvuia ez eo deut ar Brezoneg da veza eur yez distag diouz ar C'hembraeg hag ar C'herneveg war dro ar seizvet kantved.

Diforc'h a reer en istor ar Brezoneg teir amzer :

1. AR BREZONEG KOZ. — Eus ar seizvet kantved betek an unnekvet kantved, setu e vare. Ne chom ganeomp evit studia yez hon tadou en amzer-se nemet nebeut a zanvez : anoiou-tud hag eun niver gerioù all.

A. *Anoiou-tud*. O c'havout a reer e Buheziou ar Sent, skrivet e latin, hag e Diellou. An Diellou talvou-

dusa a gaver e Dielladur Redon, savet war-dro an unnekvet kantved. Kalz eus dielloù an dastumadenn-se a sav d'an navet kantved hag eun hinienn bennak d'an dekvet. Kavout a reer ivez anioù e Dielladur Landevenneg, a zo an darnvuia anezañ eus an unnekvet kantved.

B. *Geriou*. Ar re-mañ a zo anezo gerioù-spisa, a skrive gouizieien vrezon d'o sikour da lenn al levriou latin a student. Boas edont, en eur lenn latin, da skriva eur ger brezonek, a dalveze eur ger latin na anavezent ket, a-us d'ar ger-se, pe dindanañ, pe en e gichen, en dournskrid a oa danvez o studi. Sed amañ roll an dournskridoù ma kaver enno gerioù-spisa brezonek :

1. Eun teskad bihan a zo e Levraoueg Bodley, strollet enni dournskridoù lies-seurt o sevel d'an navet kantved. Unan anezo a zo anezañ Gramadeg Euty-chius, pe ar skrid « De conjugatione » (an displegadur-verb) gant Eutychius. Anvet eo al levrenn *Oxonien-sis Prior*, hag, ouspenn ar gerioù-spisa brezonek, ez eus ennañ ivez gerioù-spisa kembraek. Moulet int bet holl e *Grammatica Celtica* Zeuss-Ebel, pp. 1052-1063.

2. Kavout a reer eun nebeut gerioù el *Luxembourg Folio*, eur follenn staget ouz eun dournskrid all. Moulet int bet e Gramadeg Zeuss-Ebel pp. 1063-1065. Studiet int bet gant John Rhys er *Revue Celtique*, I, pp. 346-375. Sevel a ra follenn Luxembourg, hervez Zeuss, d'an navet kantved.

3. Kavout a reer seiz hag hanter kant ger e dournskrid Bern 167, a zo ennañ diskleriadurioù pe notennoù a-zivout Vergilius. Sevel a reont d'an navet pe zekvet kantved.

4. Eun dournskrid a zo e levraoueg Skolaj Korf ar C'hrist e Kaergraout, ennañ labour Amalariis « De divinis officiis ». Hervez Bradshaw, skrivet eo bet an dournskrid e 952. Kavout a reer gerioù-spisa brezonek el labour-se.

5. Kavout a reer lod all en Dastumadenn Reoliou, a sav d'eun amzer etre an navet hag an unnekvet kantved, a zo miret hizio e Paris.

Dastumadennoù all a reoliou, o sevel d'an hevelep koulz, hag enno gerioù-spisa brezonek, a zo miret e Redec'hen (Oxford) hag e Mirdi Predenek Lunden.

Eun dastumadenn yaouankoc'h a zo ivez e Paris. Ne sav ket avat d'eun amzer tostoc'h eget an unnekvet kantved.

6. An Dastumadenn reoliou, a zo miret en Orléans, hag o sevel d'an dekvet ha d'an unnekvet kantved, a ro ivez eun niver a c'herioù-spisa brezonek.

2. AR BREZONEG KRENN. — Evit studia ar brezoneg krenn n'eus koulz lavaret nemet Dielloù betek ar pemzekvet kantved. Ar seiz frazenn, ma vez graet anezo *brezoneg Ivet Omnes*, a zo en eun dournskrid eus 1350. Ar skrid kosa bet embannet betevremañ a zo *An Dialog Etre Arzur Roe d'an Bretou-net Ha Guynglaff*. Bloaziet eo eus 1450. En eun dournskrid gallek eus 1456, *le mystère de la Résurrection* e kaver ar *C'hredo* e brezonek. Ar geriadur gallek, latin ha brezonek, a zo *Catholicon* e ano, a sav, dre e zournskrid kosa, da 1464.

Araok ar skridoù-se, n'eus nemet an Dastumadennoù Dielloù :

1° Dielloù Kemperle eus an XII^e ha XIII^e kantved.

2° Diellou Kemper, miret e Levraoueg Broadel Bro-C'hall eus an XIIIth-XIVth kantved.

3° Diellou Abati Prières, hervez eilskrid Dom Gwilherm Gautier, savet e 1648 (Bro-Wened).

4° Paperou-mammenni Istor Sant Erwan eus ar XIVth kantved.

5° Diellou kastell Lestiala e-kichen Pont-n-Abad eus ar XIVth kantved.

6° Skridou Santelezhadur Sant Visant Ferrer, eus kreiz ar XVth kantved, talvoudus-dreist evit brezoneg Gwened.

7° Diellou prioldi Sant Varzin Josselin, abati Lanvaos, kastell Kerguehennec, Kerfily, goveliou Lanouée, abati al Levenez en Henbont.

8° Geriadur anoiou-lec'h ar Morbihan gant Rosenzweig, 1870.

Daoust ha ret eo d'eomp kredi n'eus ket bet a lennegezh vrezonek e Breiz-Vihan kent ar pemzekvet kantved ? Nann. Eur skol varzed a zo bet er vro-mañ evel m'hen diskouez an doare gwerzaouriez miret, betek e misteriou hag e barzonegou all ar c'houezekvet kantved, gant e glotennou diabarzh hol laka da soñjal e gwerzaouriez gouiziek Bro-Gembre. N'hell ket eur seurt gwerzaouriez padout hep oberou da dalvezout da skouerien d'an diskibien barzed. Diaes eo lavarout, avat, ha niverus eo bet an oberou-se, ken diaes all gouzout ha lakaet eo bet an oberou-se dre skrid pe miret hepken dindan eñvor, eus ar mestr d'an diskibl. Aet an oberou-se da goll, evel ma vije aet da get ar c'hanaouennou-pobl dastumet en naontekvet kantved gant Kervarker, An Uhel hag all.

N'o deus ket bet oberou hor barzed ar chañs o

deus bet kalz eus barzonegou ha kontadennou barzed Kembre da veza lakaet dre skrid evit noblañs ha lenneien o bro, chomet feal d'o yez vroadel.

An dug Hoël a Gerne en doa c'hoaz, pa veze e Kemper, ouz e heul, eur barz telenner, Kariou e ano. Ren a eure Hoël etre 1066 ha 1084. Heñ eo a zo bet, war a seblant, hon diweza dug brezoneger.

Ar re a zo deñt war e lerc'h o deus kresket ha bevet e Bro Roazon pe e Bro-Naoned. Eno ne deo bet morse koinzet ar brezoneg. Darempredou strisoc'h-striz he deus bet noblañs Breiz-Vihan ouz noblañs Bro-C'hall ha Breiz-Veur, ma oa ar galleg o yez. Diwar an dimeziou stank eo bet gallekaet hon uhelidi ha sed aze penaos eo aet da goll hol lennegezh koz.

P'en em skignas, avat, ar moulerez dre Vreiz, ez oa beo-buhezek c'hoaz ar brezoneg ha ken bras niver ar vrezonegerien ma voe ret moula levriou evito.

Prezeget e veze e brezoneg en ilizou. Eno eo e veve ar brezoneg e vuhez speredel ha nann er skolioù, ma rene enno pe al latin pe ar galleg. Setu perak ez eo ar skridou kenta moulet e brezoneg, pe eul levr da zeski latin ha galleg evel *Catholicon* Iehan Lagadeuc, pe levriou a zevosion evel an *Heurgou brezonek ha latin*, *Melezour ar Maro*, *Buhez Santez Katell*, pe c'hoaz peziou-c'hoari awenet gant ar relijion ha savet, lod bras anezo, war skouer oberou gallek pe latin an amzer-se.

Ar re gosa eus ar misteriou embannet betek hizio a zo *Buhez Santez Nonn*, eus ar pemzekvet kantved ;

Mister bras Jesus (anezañ e gwirionez ar *Basion* hag ar *Resurrection*) eus 1530 ;

Buhez Santez Barba eus 1557 ;

Buhez Sant Gwenole eus 1580. Ar mister-mañ zo

bet embannet gant an Ao. Ernault en *Annales de Bretagne*, e 1935.

Mar n'o deus ket an oberou-se eun dalvoudegez dreist evel lennegez, ma kaver enno ar si a vez alies el lennegeziou diwar skouer, da lavarout eo chom re dost, betek er yez zoken, ouz ar patrom, ne dint ket evelato ken divlaz ha ma vez lavaret peurvuia, ha n'heller ket lavarout ne ve ket beo enno eun elfenn a spered broadel, p'o gweler o pledi gant tud santel ar vro, evel Santez Nonn pe Sant Gwenole.

3. BREZONEG-BREMAN. — N'eo ket er soniadoueriez eo e kaver an abegou da rei ar XVII^e kantved evel derou ar brezoneg-bremañ. N'eus abeg all ebet nemet ar c'hemmou degaset en doare da skriva ar brezoneg gant an tad Juluan Maner.

En e levr *Collech sacr Iesu-Christ* e c'houlenn ma vo skrivet dalc'hmat kemmaduriou ar c'hensonennou derou-ger. Bete neuze n'oa reolenn ebet. En entremar e veze dalc'hmat ar skrivagner etre skriva ar ger evel m'hen distage pe derc'hel d'ezañ e furm geriadur. Mar kaver er skritur skoueriou eus kemmaduriou e brezoneg (da skouer *Ran Uilian* e 797. *Uilian* a zo kemmadur *Bilian*), abaoe gwall bell zo, ne vezent ket ken boas hag e kembraeg da nebeuta. E *Levr Du Kervarzen* e kaver war an dachenn-se, ar c'hembraeg koulz lavaret en hevelep stad hag ar c'hembraeg bremañ. Ne deo ket diaes kompren penaos an Tad Maner, anezañ eur Breiz-Uhelad, desket gantañ ar brezoneg evit prezeg e Breiz-Izel, en deus merzet gwelloc'h ar gouñid a vije evit an deskarded kavout, er skridoù, ar gerioù evel ma vezont distaget.

A-hendall ar brezoneg, dibennet e gwirionez eus e

dud desket, ma oa ar galleg hag al latin yez o deskadurez, a stag d'en em ranna-e brezonegou hep nemeur a zarempredoù etrezo.

Ar gensonenn-dent-c'houez-blot z a zo aet da get, e diabarz ar gerioù hag en dibenn anezo, e brezoneg Gwened, Kerne ha Treger. E brezoneg Leon ez eo manet, distaget evel z e galleg.

Ar gensonenn-dent-c'houez-dison th a zo deut da veza h e dibenn ar gerioù e brezoneg Gwened : *lèh* elec'h laez, *lès* e lec'h all.

E diabarz ar gerioù ar z, deut eus th, a ya da get e brezoneg Gwened.

Ar pouez-mouez a zo lec'hiet muioc'h-mui war eil silabenn diweza-an darnvuia eus ar gerioù, nemet e brezoneg Gwened. Añañ e chom war ar silabenn diweza. Kement-se eo a zegas kemmou bras a-walc'h etre brezoneg Gwened ha brezoneg ar peurrest eus Breiz-Izel, war-dro ar XVI^e kantved.

Ar skrid hir kenta e brezoneg Gwened, anezañ eur reolennadur ar bedenn-sul, a zo miret en eun dournskrid eus 1693. Embannet eo bet gant an Ao. Loth e *Chrestomathie Bretonne*, pp. 327-332 dindan an talbenn-mañ :

Er forme ag er pron, e brehonnec Guennet.

Ar skridoù e brezoneg bremañ a zo hevelep re hag er brezoneg-krenn. Levrioù a zevosion niverus a bep seurt, peziou-c'hoari, o yaouankaat misterioù koz, ouz o disleberi ivez alies. Nemet e vo kavet, sur a-walc'h, darnou a dalvoudegez enno, ma varnomp diouz ar pezh a zo bet roet d'eomp e *Feiz ha Breiz* Meurzh-Ebrel 1941 gant an Ao. Iwan en Diberder.

An XVIII^e kantved a zo bet koulz ar Geriaduriou.

Menegomp e 1723 *Geriadur brezonek-gallek* P. de Chalons ; e 1732, *Geriadur gallek-keltiek* Gregor a Rostren ; e 1744 *Geriadur gallek-brezonek* de l'Armerye, o pledi gant brezoneg Gwened evel hini P. de Chalons ; e 1752, *Geriadur* Dom Le Pelletier.

An XIXth kantved heñ en deus gwelet lennegezh Vreiz oc'h advleunia, goude labouriou ar Gonideg da reiza an doare-skriva. *Barzaz Breiz* Kervarker, *Dastumadennou Gwerzioù ha Sonioù* An Uhel a zo a bouez dreist. Labouriou ar varzed, ar skrivagnerien, o heulia an eil pe egile, ne dint ket didalvez kennebeut. Goude ar rummad kenta-se ez eus deut eur rummad all bodet dreist-holl en-dro d'ar gevredigezh : *Gorsez Barzed Breiz-Vihan*, pe levezonet gant *Kroaz ar Vretoned*, *Feiz ha Breiz* ha *Dihunamb*. N'hellomp nemet menegi barzed bras evel Kalloc'h-Bleimor ha Tangi Malmanche.

Etre an daou vrezel 1914-1918 ha 1939, ar strolladou koz o deus kendalc'het da labourat ha kelaouennou koz ha yaouank da vev. Levezon Vallée, Ernault ha Meven Mordiern avat a zo bet kreñvoc'h war ar skrivagnerien bodet en-dro da Roparz Hemon ha d'e gelaouenn *Gwalarn*.

An amzer a zigor bremañ, avat, a vo hini ar peurunvani evit ma teui, en diwez, ar brezoneg da vat er skolioù, ha ma vo n'eo ket hepken yez hor c'halon, hogen ivez hini hor spered.

II

Eun damskeud eus istor hor yez

4. EUS AN HENGELTIEG D'AR BREZONEG. — An hengeltieg eo ar yez-vamm evel m'edo goude an emranidigezh etre gouezeleg ha galianeg, da lavarout eo e-pad ar c'henta milvet kent H. S. hag ar pemp kantved goude.

Sed amañ eun daolenn a ro d'eomp daou benn an hent hir graet gant hor yez.

1. Silabenn ziweza ar gerioù hen-geltiek a ya da get, ha da heul ez a da goll an displega anioù a oa anezañ en hen-geltieg evel en holl yezou indezeuropek an Hen-amzer.

<i>prennos</i> « gwezenn vras »	...	<i>prenn</i>
<i>ben</i> « maouez »	...	<i>ben</i> (en eben,
		kamm-skrivadur evit heben).
<i>katus</i>	...	<i>kad</i>
<i>mori</i>	...	<i>mor</i>
<i>tarvos</i>	...	<i>tarv, taro</i>
<i>dervo-</i>	...	<i>derv, dero</i>
<i>karros</i>	...	<i>karr</i>
<i>litus</i>	...	<i>lid</i>
<i>bitus</i>	...	<i>bed</i>
<i>karvos</i>	...	<i>karv, karo</i>
<i>yaro, yara</i>	...	<i>yar</i>

2. Ar *g* etre diou vogalenn a ya da get.

E dibenn ar gerioù kemendall.

tigerno *tiern*
magus « mevel » *mgo* (en
Maodeiz, Maodez); ac'hano
maouez a dalveze da genta kement ha « *ma-*
tez ».

magos « tachenn » *ma* (en
anoïou-lec'h evel *Goariva*); ac'hano *maez*.

brogi *bro*
tigos *ti*
**baragas* *bara*
Rigakos *Riek*
slouga, sloga *lu* « arme »
**agileta* *aoled, oaled*

Notenn. — Skouerioù eus mont da get ar *g* en
amzer an Impalaerded roman a gaver war en enskri-
vadurioù : *Mounti* e lec'h *Mogonti*, *Mouno* e lec'h
Mogouno.

Sed amañ evit eur ger derezioù kemmadenn ar
-g etre-vogalennek : eus *magalos* da *mel* :

III^{vet} kantved kent H. S. *Magalos*
II^{vet} kantved *Magilos*
V^{vet}-VII^{vet} kantved goude H. S. . . . *Maglus*
VIII^{vet}-IX^{vet} kantved *Mail*
IX^{vet}-XIII^{vet} kantved *Mael*
XIII^{vet}-XX^{vet} kantved *Mel* « bras »

3. Ar *kk* a ya da *c'h*.

**otikkos* *ozec'h, ozac'h*
**brokkos* *broc'h*
mokkos *moc'h*
**virakka* *gwrac'h*

Notenn. — Ar brezoneg *ozec'h*, liester *ezec'h* a zeu
eus *otikkos*, liester *otikki*. Ar furm greñn-vrezonek
(XIII^{vet} kantved) *odec*, *ozec* a zeu eus *otikos*. Evelse
e brezoneg-bremañ, e keñver *gwrac'h* eus **virakka* e
kaver *gureg* eus **viraki*.

4. Ar *k* hag ar *g* war-lerc'h *r* a ya da *c'h*.

markos *marc'h*
argio- *erc'h*
arganto- *arc'hant*
**mërga* *merc'h*
**serga* « karantez » *serc'h*
**korka* *kerc'h*
iorkos *yourc'h*

5. Ar *b* a ya da *v*.

gabros *gavr*
aballos *aval*
abona *avon, aven,*
« ster »
kaballo *kaval*
labaros *lavar*
treba, trebo- *trev*
gobans *gov*

6. An *d* a ya da *z*.

vidus *gwez*
medus « chufere » *mez*
meduos, -dua, -duon *mezu, mezo*
bardos *barz*
Nódons *Nuz*
roudos, -da, -don *ruz*

7. An *tt* a ya da *z*.

kotto *koz*
kattos *kaz*
**petto* *pez*
**latto* *laz*

8. An *t* war lerc'h *r* a zo aet da *z*.

<i>artos</i>	<i>arz</i>
<i>nerios</i> « nerzus »	} <i>nerz</i>
<i>nerton</i> « nerz »	

9. An *t* e diabarz ar gerioù hag etre diou vogaleññ a zo aet da *d*, a-wechou da *z*.

* <i>vindo-biturikos</i>	<i>guinuizic</i> <i>gwenvidik</i>
--------------------------------	--------------------------------------

10. Ar *v* e penn ar gerioù dirak *a*, *e*, *i*, *o*, a ya da *gw*, *gou*.

<i>verno</i>	<i>gwern</i>
<i>vasso</i>	<i>gwaz</i>
<i>vindos</i> , - <i>da</i> , - <i>don</i>	<i>gwenñ</i>
<i>vobera</i>	<i>gouwer</i> , <i>gouer</i>
<i>vidus</i> « koad »	<i>gwez</i>
<i>viros</i>	<i>gour</i>
<i>ver</i> (kentger kreñvaat)	<i>gour</i>

11. An *s* e penn ar gerioù a ya da *h*.

<i>senos</i>	<i>hen</i>
<i>senton</i>	<i>hent</i>
<i>samos</i>	<i>hanv</i>
<i>samalos</i> , - <i>lis</i>	<i>hañval</i> , <i>heñvel</i>
<i>seros</i>	<i>hir</i>
* <i>samiteros</i>	<i>hanter</i>
<i>sukaros</i>	<i>hegar</i>

Notenn. — An *s* hen-geltiek a oa aet da *h* e brezo-neg da vare an enbroadegou en *Aremorika* ; an *s* hengeltiek a zo manet avat en anioù-lec'h degemeret gant ar Vrezoned, da skouer *Sara*, eur ster a vro-Wened, a zo deñt da veza *Sar* e brezoneg (ano-lec'h *Bren-Sar* e Loth. Chrest., p. 230).

12. An *x* e dibenn ar gerioù a ya da *get*.

<i>rix</i> « roue »	<i>ri</i> (en anioù-tud hen-vrezonek ha krenn-vrezonek).
---------------------------	--

13. An *a* hir a ya da *eu*.

<i>maros</i>	<i>meur</i>
<i>lanos</i>	<i>leun</i>
<i>laros</i>	<i>leur</i>
<i>blatos</i>	<i>bleud</i>

Notenn. — Ar ger *maros* a zo stank souezus en anioù hen-geltiek diou-gevrennek a dud. Dont a ra *maros* hen-geltiek da veza *maros* en Enez Vreiz e-tro ar VI^{vet} kantved goude H. S. (*Anatemoros*, *Kunomoros*, *Ermor* « bras meurbet ». Deñt eo da veza *mur*, *meur* e Breiz-Izel diwar an XIII^{vet} kantved.

14. An *e* hir a ya da *oe*, *oue*, *oa*, *oua*.

<i>keton</i>	<i>koed</i> , <i>koad</i>
<i>leto</i>	<i>loued</i>
<i>redos</i>	<i>roez</i> , <i>rouez</i>
<i>Redones</i>	<i>Roazon</i>
<i>devos</i>	<i>Doe</i> , <i>Done</i>
<i>esarnon</i>	<i>houarn</i>
* <i>lega</i>	<i>loa</i>

15. An *ou* pe *o* hir a ya da *u*.

<i>slouga</i> , <i>sloga</i>	<i>lu</i> « arme »
<i>Nodons</i>	<i>Nuz</i>
<i>touta</i> , <i>tôta</i> « pobl »	<i>tud</i>
<i>roudos</i>	<i>ruz</i>

16. An *u* hir a ya da *i*.

<i>dunon</i>	<i>din</i>
<i>runa</i>	<i>rin</i> « tra guz »

17. An *u* berr a ya da *o*, *ou*.

<i>dubnos, dumnos</i>	<i>doun, don</i>
<i>dubron</i>	<i>dour</i>
<i>durnakos</i>	<i>dournek</i>
<i>kunes</i>	<i>koun, kon,</i> « chas »

18. An daouad *sv* a ya da *c'h*.

<i>svervos</i>	<i>c'houerv</i> <i>c'houero</i>
--------------------------	------------------------------------

19. An diou-lizerenn *-av-, -ov-* a ya da *ou, o*.

<i>Vellavos</i>	<i>Goelou, Goelo</i>
<i>*bitoves</i>	<i>(bedou) -ou</i>

-oves a zo tro-envel lies ar pengefiou en *u*
evel *bitus* « bed ».

20. An dioulizerenn *pt* a ya da *ez*.

<i>kaptos</i>	<i>kaez</i>
-------------------------	-------------

21. An diou-lizerenn *kt* a ya da *-ez, -eiz, -oaz*.

<i>lakte</i>	<i>laez</i>
<i>okto</i>	<i>eiz</i>
<i>*noktos</i>	<i>noaz</i>
<i>*noktigestro</i>	<i>neizeur</i>
<i>vikto</i>	<i>faez</i>
<i>pikto-</i>	<i>piz</i>

5. AMPRESTOU LATIN. — Eun niver bras a c'heriou latin a zo bet amprestet e Breiz Veur e-pad ar rene-
rez roman en enezenn, ha kalz eus ar gerioù-se o
deus graet hent betek Iwerzon. Amprestou all a zo
bet graet diwezatoc'h a-dreuz ar galleg-krenn pe ar
saozneg. An amprestou yaouankoc'h-mañ n'o deus
ket an hevelep talvoudegez evit istor ar yezou kel-
tiek.

An amprestou latin koz avat a zo kalz kenteliu-
soc'h e-keñver istor ar sonouriez keltiek eget ne deo
ar gerioù keltiek a orin o-unan.

VOGALENNOU. — A) *berr*

Manet int digemm evel ar vogalennoù keltiek berr.

1. *a* latin :

lat. <i>cathedra</i>	brez. krenn <i>cadoer</i>
<i>arca</i>	brez. <i>arc'h</i>

2. *o* latin a zo digemm :

lat. <i>corpus</i>	brez. <i>korf</i>
--------------------	-------------------

nemet dirak i :

lat. <i>historia</i>	brez. <i>ster</i>
<i>episcopi</i>	brez. krenn <i>esquep</i>

Dirak strolladoù kensonennoù a zo, *o* a-wechou a
zeu da veza *u* (= *ou*) :

lat. <i>sonus</i>	brez. <i>soun</i>
<i>solidus</i>	<i>saout</i>

E silabennou nann-dibenn-ger e teu *o* da veza *eu* :

lat. <i>fontana</i>	kemb. <i>ffynnon</i>	brez. <i>feunteun</i>
---------------------	----------------------	-----------------------

3. Lat. *u* (= *ou*) a zeu da veza

o dirak eun *-a* dibenn fatet :

lat. <i>fuga</i>	kembr. <i>ffo</i>
------------------	-------------------

y dirak eun *-j* dibenn fatet :

lat. <i>diluvium</i>	kembr. <i>dilyw</i>
----------------------	---------------------

ü a-wechou dirak kensonennoù diweuz :

lat. <i>humilis</i>	brez. <i>uvel</i>
---------------------	-------------------

4. Lat. *e* a zo manet :

lat. <i>cella</i>	brez. <i>kel(l)</i>
-------------------	---------------------

Evez. ouz.:

lat. *vésper*

brez. *gousber*

5. Lat. *i* :

lat. *cippus*

brez. *kef*

lat. *vigilia*

brez. *goel*

VOGALENNOU. — B) *hir*

1. Lat. *a* :

lat. *cáseus*

kembr. *caws*

brez. *queus*

altàre

allawr

aoter

créditura

creadur

krouadur

peccatorem

pechadur

pechezr

2. Lat. *o* :

lat. *scopa*

kembr. *awr*

brez. *skub*

hora

eur

3. Lat. *u* :

lat. *murus*

kembr. *mur*

brez. *mur*

nêmet lat. *cupa*

cib

kib

4. Lat. *e* :

lat. *cera*

kembr. *cwyr*

brez. *koar*

pensum

pwys

pouez

déscendo

disgyn

diskenn

5. Lat. *i* :

lat. *uînum*

kembr. *gwin*

brez. *gwin*

C) DIOUVOGALENNOU LATIN

1. Lat. *au* :

lat. *aurum*

kembr. *aur*

brez. *aour*

caulis

cawl

kaol

2. Lat. *ae* :

lat. *praedico*

brez. kr. *prezec*

3. Lat. *oe* :

lat. *poena*

brez. *poan*

D) Lat. *w* ha *j* :

1.

lat. *civitatē*

kembr. *ciwdod*

brez. kr. *queudet*

priuatus

kemb. kr. *priawt*

brez. *pried*

2.

lat. *Jove*

kembr. *Iau*

brez. *Yaou*

major

maer

maer

E) Lat. *h*, *s*, *f* :

1. Lat. *h* a zo aet da get en amprestou

2. Lat. *s* a zo digemm peürvuia :

lat. *saccus*

kembr. *sach*

brez. *sac'h*

asinus

asyn

azen

Lat. *sk* :

lat. *schola*

kembr. *ysgol*

brez. *skol*

Lat. *ks* :

lat. *crux*

kembr. *crwys*

brez. *croes*

3. Lat. *f* - :

lat. *februarius*

kembr. *Chwefror*

brez. *C'houevrer*

fabā

ffa

fao

fenestra

ffenestr

prenestr

F) KENSONENNOU TARZ-MOUEZIET

1. Lat. *g*, *-g* :

a)

lat. *gemellus*

kembr. *gefell*

brez. *gevell*

b)

sagitta

saeth

saez

lat. *-gr-*

lat. *Agricola*

kembr. *Aercol*

lat. *-gl-*, *-gn-*, *-rg-*

lat. *Margarita*

brez. *Marc'harit*

2. Lat. d -d-

a)			
lat. <i>dūrus</i>	kembr. <i>dur</i>	brez. <i>dir</i>	
b)			
<i>fides</i>	<i>ffydd</i>	<i>feiz</i>	
c) lat. -dr-			
lat. <i>quadrāgēsima</i>	kemb. <i>Y Garawys</i>	brez. <i>koraiz</i>	
lat. -rd-			
lat. <i>ordo</i>	kembr. <i>urdd</i>	brez. <i>urz</i>	
lat. -ld-			
lat. <i>caldāria</i>	kembr. <i>callawr</i>	brez. <i>kaoter</i>	
lat. -nd-			
lat. <i>calenda</i>	kembr. <i>kalan</i>	brez. <i>kala</i>	

3. Lat. b

a) b-			
lat. <i>baculus</i>	kembr. <i>bagl</i>	brez. <i>bael(ec)</i>	
b) -b-			
lat. <i>scribo</i>	kembr. <i>ysgrif</i>	brez. <i>skriua</i>	
c) -br-			
lat. <i>librum</i>	kembr. <i>llyfr</i>	brez. <i>levr</i>	
-rb-			
lat. <i>barba</i>	kembr. <i>barf</i>	brez. <i>baro</i>	
-mb-			
lat. <i>columba</i>	kembr. <i>colomen</i>	brez. <i>koulm</i>	

G) KENSONENNOU TARZ-DIVOUEZ

1. Lat. k

a) k-			
lat. <i>certus</i>	kembr. <i>certh</i>	brez. <i>kerz, querz</i>	
b) -k-			
lat. <i>manica</i>	kembr. <i>maneg</i>	brez. <i>maneg</i>	
c) -kt-			
lat. <i>lacte</i>	kembr. <i>llaeth</i>	brez. <i>laez</i>	
<i>maledictio</i>	<i>melltith</i>	brez. kr. <i>malloez</i>	
lat. -kr-			

lat. <i>consecro</i>	kembr. <i>cysegr</i>	
lat. -rk-		
lat. <i>arca</i>	kembr. <i>arch</i>	brez. <i>arc'h</i>
lat. -lk-		
lat. <i>calcem</i>	kembr. <i>calch</i>	
lat. -nk-		
lat. <i>cancellus</i>	kembr. <i>cangell</i>	brez. kr. <i>cancell</i>
lat. -kk-		
lat. <i>siccus</i>	kembr. <i>sych</i>	brez. <i>sec'h</i>

2. Lat. qu-

lat. <i>coquina</i>	kembr. <i>cegin</i>	brez. <i>kegin</i>
---------------------	---------------------	--------------------

3. Lat. t

a) lat. t-			
lat. <i>tendō</i>	kembr. <i>tynnu</i>	brez. <i>tenna</i>	
b) lat. -t-			
lat. <i>nota</i>	kembr. <i>nod</i>	brez. <i>nod</i>	
c) lat. -tr-			
lat. <i>latro</i>	kembr. <i>lleidr</i>	brez. <i>laer</i>	
lat. -rt-			
lat. <i>torta</i>	kembr. <i>torth</i>	brez. <i>torz</i>	
lat. -lt-			
lat. <i>cultellus</i>	kembr. <i>cyllell</i>	brez. <i>kontell</i>	
lat. -nt-			
lat. <i>planta</i>	kembr. <i>plant, « bugale »</i>		
lat. -ntr-			
lat. <i>contrarius</i>		brez. <i>contrell</i>	
lat. -tt-			
lat. <i>cattus</i>	kembr. <i>cath</i>	brez. <i>kaz</i>	

1. Lat. p

a) p-			
lat. <i>petras</i>	kembr. <i>Pedr</i>	brez. kr. <i>Pezr</i>	
b) lat. -p-			
lat. <i>opera</i>	kembr. <i>ober</i>	brez. <i>ober</i>	

c) lat. -pt-		
lat. <i>Aegyptus</i>	kembr. <i>Aifft</i>	
lat. -pr-		
lat. <i>Aprilis</i>	kembr. <i>Ebrill</i>	brez. <i>Ebrel</i>
lat. -pl-		
lat. <i>pop(u)lus</i>	kembr. <i>pobl</i>	brez. <i>pobl</i>
lat. -sp-		
lat. <i>spatium</i>	kembr. <i>ysbaid</i>	
lat. -rp-		
lat. <i>corpus</i>	kembr. <i>corff</i>	brez. <i>korf</i>
lat. -mp-		
lat. <i>imperator</i>	kemb. <i>ymherawdr</i>	brez. <i>impalaer</i>
lat. -mpl-		
lat. <i>templum</i>	kembr. <i>k. temhyl</i>	

H) KENSONENNOU SONEK LATIN

1. Lat. r		
lat. <i>règula</i>	kembr. <i>rheol</i>	brez. <i>reol</i>
2. Lat. l		
lat. <i>librum</i>	kembr. <i>llyfr</i>	brez. <i>lefr</i>
lat. -ll-		
lat. <i>cella</i>	kembr. <i>cell</i>	brez. <i>kell</i>
3. Lat. n		
lat. <i>terminus</i>	kembr. <i>terfyn</i>	
4. Lat. m		
a)		
lat. <i>medicus</i>	kembr. <i>meddyg</i>	brez. <i>mezek</i>
b) lat. -m-		
lat. <i>numerus</i>	kembr. <i>nifer</i>	brez. <i>niver</i>
lat. <i>testimonium</i>	testun	brez. <i>testeni</i>
c) lat. -mn-		
lat. <i>columna</i>	kembr. <i>colofn</i>	
lat. -rm-		
lat. <i>arma</i>	kembr. <i>arf</i>	

lat. -Im-		
lat. <i>palma</i>	kembr. <i>palf</i>	brez. <i>palv</i>

6. KONTAMMADUR AR VOGALENNOU

1. Abaoe amzer ar gramadegour Zeuss e reer kontammadur ar vogalennoù eus

a) ar c'hemm degaset gant *a* hir diwez keltiek pe *a* berr diwez latin, war *i* pe *u* berr, en *o* raok ;

b) ar c'hemm degaset gant eun *i* hir diwez pe eur -j- diwez, araok d'ezo koueza, e vogalennoù berr ar silabennou araok ;)

k) ar c'hemm degaset gant *i* hir, manet e diabarz eur ger, er vogalennoù *a*, *o*, *u* berr eus ar silabennou araok.

2. An eil daryoud a zo ar pouezusa. C'hoarvezet eo araok m'eo kouezet ar vogalennoù diwez hir, hogen aet oa da get d'ar poent se ar vogalennoù diwez berr. Kemendalc a zo gwir evit an daryoud kenta.

3. Ar vogalennoù diwez *a* hag *i* hir o deus kontammet ar vogalennoù araok en abeg d'o liou ha nann d'o ment pegwir oa steuziet *i* hag *a* diwez berr d'ar poent-se.

4. Ar c'hontammadur diwar levezon *a* hir, o kemma *i* berr diabarz en *e*, hag *u* berr diabarz en *o* berr, ne deo anat hizio an deiz nemet e kembraeg, rak e kerneveg ha brezoneg ez eo kemmesket *i* hag *e* berr, *u* hag *o* berr adal an dekvêr kantved.

5. Kontammadur ar vogalennoù a zo c'hoarvezet etre ar c'houec'hvet ha seizvet kantved.

6. Kontammadur gant *a* hir diwez keltiek pe *a* berr diwez latin :

lat. <i>manica</i>	a zeu da	<i>maneg</i>	e brez.
» <i>astilla</i>	»	<i>astell</i>	»
» <i>pila</i>	»	<i>pel</i>	»
» <i>bucca</i>	»	<i>boch</i>	»
» <i>furca</i>	»	<i>forch</i>	»
» <i>turma</i>	»	<i>torv</i>	e kembr.
» <i>purpura</i>	»	<i>porphor</i>	»

7. Kontammadur gant *i* hir pe *j* diwez, araok d'ezo koueza :

E brezoneg ar vogalenn kontammet a zeu da *e*, nemet pa 'z eus *i* pe *j* er silabenn warlerc'h, an *e* a zeu peurvuia da *i* :

1. *a* dirak *j* :

<i>Caliaci</i> Og.,	brez. <i>killek</i>
lat. <i>alius</i>	brez. <i>eil</i>
kembr. <i>gair</i>	brez. <i>ger</i>

a dirak *i* kouezet :

kembr. <i>gwraig</i>	brez. <i>gwreg</i>
----------------------	--------------------

a dirak eun *i* dibenn ger :

lavaras, liviris ; *bran* lies. *brini*

3 p. 1 p. *taro* » *tirvi*

2. *o* dirak *j*, pe *i* diwez :

lat. <i>historia</i>	brez. <i>ster</i>
brez. <i>maout</i>	lies. <i>meot</i>
» <i>kok</i>	lies. <i>kigi</i>
hen-vrez. <i>nouuid</i>	brez. <i>nevez</i>
brez. <i>torr</i>	ano-verb. <i>terri</i>
kembr. <i>golchi</i>	brez. <i>gwelc'hi</i>

o dirak *i* en hevelep silabenn :

brez. <i>oan</i>	lies. <i>ein</i>
brez. <i>tro</i>	ano-verb <i>trei</i>

3. dirak *i* manet e diabarz eur ger, *e* koz hag *e* brez., o tont diouz indez-europ. *i*, o deus roet *i* :

kembr. <i>ewin</i>	brez. <i>ivin</i>
--------------------	-------------------

7. AR POUENZ-MOUEZ

Daou benn-abeg a zo bet d'ar c'hemmou degouezet e stad ar brezoneg e-kerz ar seizvet kantved d'hen degas tost d'ar stad a zo e hini bremañ :

1. Ar c'hemm a zo deut e natur hag e lec'h ar pouez-mouez.

2. Ar silabennou dibenn a zo kouezet.

*
*

En indezeuropek ar pouez-mouez oa dieub : koueza a c'helle war n'eus forz pe silabenn.

En iwerzoneg edo ar pouez-mouez war silabenn genta an anioù digevrenn ha kevrennek hag er verbou digevrenn.

E c'heller kredi ez eo bet heñvel er yezou keltiek all. Eur ger latin amprestet evel m'eo *episcopus* en doa e bouez-mouez war ar silabenn rag-belost. Setu perak eo deut da *evesque* e galleg. E brezoneg avat en deus roet *eskob*. N'hell beza c'hoarvezet kement-se nemet dre ma save ar vouez war ar silabenn genta, en eur ober eus an eil eur silabenn didon. Eun eil pouez-mouez oa da c'houde war an eil silabenn ziweza.

An eil pouez-mouez a zo deut da veza start-elec'h m'oa sonerezus an hini kenta.

Efed ar pouez-mouez start-mañ a zo bet kas da get silabenn diweza ar gerioù. Eur wech koazet ar re-mañ, eo aet ar pouez-mouez war eil silabenn diweza nevez ar gerioù, nemet e rannyez Gwened.

Koulskoude kavet e vez ar pouez-mouez war ar silabennou diweza bremañ estreget e yez Gwened.

1. e gerioù m'eo ar silabenn diweza anezo eur ber-
radur eus diou silabenn gosoc'h :

brezon. *gwellât*, skrivet en abeg da se *gwellaat*.

2. e gerioù kevrennek evel

kreisteiz, ebet, antronoz.

8. KEMMOU ER VOGALENNOU

Efedou an daou bouez-mouez meneget a-us a zo
bet ar re-mañ :

1. ar vogalenn pouezmoueziet a zo manet ;

2. ar silabennou dibenn a zo aet da get ;

3. ar vogalenn araok ar pouez-mouez a zo kouezet
pa oa berr, ha herraet pa oa hir ;

4. ar vogalenn goude ar pouez-mouez a zo chomet,
berr pe hir, pa n'edo ket e silabenn diweza ar ger ;

5. ar vogalennou hep pouez-mouez chomet a zo bet
dislivet holl, nemet ar re a oa dirak diou gensonenn ;

6. vogalennou berr pouezmoueziet a zo bet hiraet
lod anezo ;

7. ar vogalennou hir pouezmoueziet a zo deut da
veza diouvogalennou.

Skouerioù :

1. keltiek *Cûnâgnos*, gant daou bouez-mouez, a zo
deut da veza *Cunan*. Pa ne van mui nemet an eil
pouez-mouez, e teu da veza *Cynan* e kembraeg, *Co-*
nan e brezoneg. Ar vogalenn pouezmoueziet-start a
zo manet.

2. keltiek **novjo*, br.-koz *novid*, br. bremañ *nevez*.
keltiek **bratir*, br. krenn *breuzr*, br. brem. *breur*.

3. keltiek **senocastu-*, brez. krenn : *hencass* (= *hendraezou*)

latin *trinitatem*

brez. krenn *trindet*

latin *mâcéria*

brez. krenn *mâcoer*

latin **mêsûra*

brez. krenn *mêsûr*

4. latin *liber*

brezoneg *levr*

latin *litterae*

brezoneg *lizer*

5. Ar brezoneg-krenn *Trindet* a zo ennañ an dibenn-
ger *-tot* dislivet.

Er brezoneg bremañ eun *e* a c'hell beza eun disli-
vadur eus *o, u, e, i* berr, ha zoken eus *a* didon.

6. ar brezon. *tad* oa berr an *a* anezañ pe e vije troet
da *o*, hogen distaget e vez dre holl *tád* ;

brez. *béd* deut eus ar c'heltiek **bitu*

7. *é* a deu da veza *oe oa* :

latin *ætas*

brez. *oad, oed*

latin *bu-cétum*

brez. *coad, coed*

latin *cêra*

brez. *coar, coer*

i a zeu da veza *oi* ha, da c'houde, *ou*

keltiek **isarno* brez. koz *hoiarn*, brez. brem. *houarn*

N'eus nemet pa deu an *i* da steki ouz eur vogalenn
all, diwar fatadur eur gensonenn, ma c'hoarvez ke-
ment se. Ahendall *i, u* deut eus *ou* ; *eu, oi, ô* ne
gemmont ket nemeur ; an *â* ne zeu da veza diouvoga-
lenn nemet e kembraeg : *aw*. E brez. e teu da *o* evit
echui en *eu*.

9. KEMMOU ER C'HENSONENNOU

Pa vez e gwirionez ar c'hensonennou e derou eur
ger, da lavarout eo : pa n'emaint ket en eur ger stag
ouz eur ger all en e raok, ez int chomet digemm be-
tek hizio, nemet ar c'hensonennou c'houez n'int ket.

S dirak eur vogalenn a zo deut da veza *h*

Seno-magli VI^{re} kantved, brez. hen

Sp a ro ff

gresian. *sphuron* brez. *ffer* (= ufern)

sr a ro fr

gresian. *srewó* brez. *froud*

sv a ro c'hw

lat. *soror* iwerz. *suir* brez. *c'hogr*

kelt. **svervos* brez. *c'houéro*

V derou en navet kantved a zo deut da gw

lat. *Veneti* brez. *Gwenet*

lat. *vinum* brez. *gwin*

Pa vezont dre ziou ar c'hensonennou a zeu da veza kensonennou-c'houez.

cc a ro c'h

saccus brez. *sac'h*

tt a ro th (z)

catta brez. *cath*

pp a ro f (ph)

cippus brez. *keff*

ct a ro ith, eth (t)

lacté brez. *krenn laez*

Pa vez eur gensonenn linkus dirak ar c'hensonennou e roont hevelep tra.

**marco* brez. *marc'h*

portus » *porth*

corpus » *corf*

Heñvel eo c'hoaz pa vezont kejet gant s :

**ouxello* brez. *uc'hel*

**fascis* brez. *bec'h*

Ar c'houezadenna er c'hensonennou-se a zo meneget er skritur adal ar VI^{re} hag ar VII^{re} kantved. Eun efed e tle beza bet eus fatadur ar vogalennou didon pe dibenn :

brocco zo deut da veza *brocc* ha da echui *broc'h*.

Eire diou vogalenn *p, t, k* a ro *b, d, g* ;

b, m, d a ro *v, v, z*.

Ar *g*, goude beza bet c'houezet, a gouez. Kement-se a zo c'hoarvezet diwar levezon ar vogalennou, araok ma oa kouezet nikun eus ar vogalennou-se. Skoueriou a gaver eus blotadur ar c'hensonennou-se adal an navet kantved :

Tudian evit *Tutian* (814)

Caduotal evit *Catuotal* (826)

Tuduual evit *Tutuual* (857)

N'eo ket en diellou hepken e kaver seurt skoueriou, hogen ivez e-touez ar gerioù spisa eus an navet ha dekvet kantved :

dadl evit *datl*

cornigl evit *cornicl*

modreped evit *motreped*

gubennid evit *gupennid*

Ar *g* a zo deut da veza kensonenn-c'houez adal ar c'houec'hvet pe seizvet kantved

Mailoc eus **Maglocus*

Aes eo gwelout en deus bet alies an *i*-se talvoudegez eur gensonenn-c'houez diwar ar pezh eo deut *g* da veza e dibenn ar gerioù goude *r* ha *l*.

**argja* ? kembr. *eiry, eira* brez. *erc'h*

virgo

gwyry

gwerch'h

daly

dalc'h

gwala

gwalc'h

Ar *b* zo deut abred ivez da *v* :

Uurvidoe a gaver e-kichen *Uurbidoe*

Matuedoe

—

Matbidoe

**Riobelinos* a zo deut da veza *Rivilin* e 874.

An *D* etrevogalenn a gaver digemm er skritur betek diwez an *XI^{re}* kantved, dre n'oa ket el lizerenneg latin arouez ebet evit *z*.

Diou ha diou ar c'hensonennou-se ne gemmont ket *credi* a zeu eus *cretim* evit *cred-dim*
aber abber ad-ber

Pa vez eun *s* dirak ar c'hensonennou-se e teuont da gensonennou-c'houez

**nizdos*, lat. *nidus*, kemb. *nyth*, brez. *neiz*.

An direizderiou a gaver d'ar reolennou-se a zeu eus levezon ar pouez-mouez a vir ouz ar vogalenn da vlotaat ar gensonenn a zo dirazi.

Mar bez ar pouez-mouez araok e teu an *d* da veza heñvel ouz an *n* a zo en *e* raok

lat. *descendo* kemb. *discynn* brez. *diskenn*
tendo tynnu tenna

Mar bez ar pouez-mouez warlerc'h e teu *d* da *t* e brezoneg :

lat. *candela* brez. *cantol*

10. AR C'HEMMADURIOU DEROU-GER

Ar pezh a c'hoarvez gant ar c'hensonennou e diabarz ar gerioù a c'hoarvez ganto ivez e derou ar gerioù, pa vez ar re-mañ strollet start etrezo, evel an ano ouz ar ger-mell, pe ar perc'henna, an ano gwan ouz an-ano, an ano ouz e araogenn.

E seurt strolladou gerioù e teu kensonenn derou an eil ger da veza, e gwirionez, eur gensonenn kreiz ger.

1. Etre vogalennou

<i>p, t, k</i>	a vez eta blotaet e	<i>b, d, g</i>
<i>b, d</i>	a zeu da veza	<i>v, z</i>
<i>m</i>	—	<i>v</i>
<i>s</i>	—	<i>z</i>
<i>g</i>	a fata.	

2. Pa vezont diou en hevelep silabenn e teu

p, t, k da veza c'houezadennet e *ph, th, c'h*
b, d, g a van digemm.

Ar ger araok dibennet gant eur vogalenn a zegas kemmadurioù an niverenn 1.

Ar ger araok echuet gant eur gensonenn a ra eus houmañ an hevelep kensonenn hag an hini a zeu da eil. Setu ma c'hoarvez an hevelep kemmadurioù hag en niverenn 2.

Setu dre vras diskleriet ar c'hemmadurioù derou ger. An hevelep abegou a zo d'ezo ha d'ar c'hemmaturioù kensonennou e korf ar gerioù.

3. Kemeromp da skouer ar gerioù perc'henna *he*, gwregel, hag *e*, gourel, skrivet o daou *he* gwechall. An daou c'her se a oa anezo troioù c'henel oc'h echui, *he* gant *s*, hag *e* gant eur vogalenn. Sed amañ penaos e tro an traou.

<i>kein</i>	<i>he-k-kein</i>	a ro	<i>he c'hein</i> ;
<i>penn</i>	<i>he-p-penn</i>		<i>he fenn</i> ;
<i>teod</i>	<i>he-t-teod</i>		<i>he zeod</i> ;
<i>kein</i>	<i>e-kein</i>	a ro	<i>e gein</i> ;
<i>penn</i>	<i>e-penn</i>		<i>e benn</i> ;
<i>teod</i>	<i>e-teod</i>		<i>e deod</i> ;
<i>gar</i>	<i>he-g-gar</i>	a ro	<i>he gar</i>
<i>brec'h</i>	<i>he-b-brec'h</i>		<i>he brec'h</i>
<i>dourn</i>	<i>he-d-dourn</i>		<i>he dourn</i>
<i>mipien</i>	<i>he-m-mibien</i>		<i>he mibien</i>
<i>gwele</i>	<i>he-g-gwele</i>		<i>he gwele</i>

kein he-k-kein a ro he c'hein
 penn he-p-penn a ro he fenn
 teod he-t-teod a ro he zeod
 kein e-kein a ro e gein
 penn e-penn a ro e benn
 teod e-teod a ro e deod
 gar he-g-gar a ro he gar
 brec'h he-b-brec'h a ro he brec'h
 dourn he-d-dourn a ro he dourn
 mipien he-m-mibien a ro he mibien
 gwele he-g-gwele a ro he gwele

<i>gar</i>	<i>e-g-gar</i>	a ro	<i>e-gar</i>
<i>brec'h</i>	<i>e-b-brec'h</i>		<i>e-brec'h</i>
<i>dourn</i>	<i>e-d-dourn</i>		<i>e-zourn</i>
<i>mipten</i>	<i>e-m-mipten</i>		<i>e-vipten</i>
<i>gwele</i>	<i>e-g-gwele</i>		<i>e-wele</i>

4. Bez' e c'hell c'hoarvezout e ve diwar fatadur eur vogalenn e dibenn eur ger, e ve echuet-hemañ gant eur gensonenn dison. Setu a c'hoarvez gant ar perc'henna *ho*, e brezoneg krenn *höz* pe *hos*. A-dreñv ar perc'henna-se e teu *b*, *d*, *g* da veza *p*, *t*, *k*

<i>hos breur</i>	a ro	<i>ho preur</i>
<i>hos den</i>	—	<i>ho ten</i>
<i>hos genou</i>	—	<i>ho kenou</i>

Evel ma welomp, ne deo mui, en amzer-mañ eus istor ar yez, an hevelep reolenn a ren ar c'hemmaduriou-mañ. Ober a reer anezo kemmaduriou dre greñvaat, e-lec'h ma roer d'an daou rumm kenta an ano a gemmaduriou c'houezadennus goude *he*, ha blotaus goude *e*.

Er c'hemmadur dre greñvaat, ez eo an *s* dison a ra eus kensonenn derou sonek ar ger war-lerc'h, *b*, *d*, *g*, eur gensonenn dison *p*, *t*, *k*.

5. Tri rumm kemmaduriou a zo eta e brezoneg :

a) daou renet gant reolennou koz :

1. Ar c'hemmaduriou blotaus ; an niverusa ar re-mañ :

<i>K</i>	<i>P</i>	<i>T</i>	<i>G</i>	<i>Gw</i>	<i>B(m)</i>	<i>D</i>
<i>G</i>	<i>B</i>	<i>D</i>	<i>H</i>	<i>w</i>	<i>V</i>	<i>Z</i>

2. Ar c'hemmaduriou c'houezadennus :

<i>K</i>	<i>P</i>	<i>T</i>	<i>K</i>	<i>T</i>	<i>K</i>
<i>C'h</i>	<i>F</i>	<i>Z</i>	<i>C'h</i>	<i>Z</i>	<i>C'h</i>

b) Eur rumm renet gant eur reolenn yaouankoc'h :

G *B*, *D*

K, *P*, *T*

c) En eur pevare rumm ez eo kemmesket reolenn ar c'hemmaduriou blotaus, ha reolenn ar c'hemmaduriou kreñvaat :

<i>D</i>	<i>G</i>	<i>Gw</i>	<i>B(M)</i>
<i>T</i>	<i>C'h</i>	<i>W</i>	<i>V</i>

N'eus nemet tri gerig o kemmeska e-giz-se eur reolenn goz gant unan yaouankoc'h :

e rannig-verb,
ma stagell,
o araogenn, dirak ano verb.

Notenn. — Ar c'hemmaduriou fri, kalz boazetoc'h e kembraeg, a gaver roudou anezo e brezoneg Gwened e furmou evel

men Doue, mem brer, men goed.

Yezadur

1. AL LIZERENNEG

Luziet eo al lizerenneg e brezoneg-krenn dre ma ra ar skrivagnerien gant al lizerenneg c'hallek, pe latin kentoc'h, ma rae diouer ennañ an arouezioù evit merka sonioù a zo eus ar yez.

1. AR VOGALENNOU : *a, e, o* a zo anat o zalvoudegez, nemet e kaver *o* e kichen *u* latin = *ou*.

i, j, y a dalvez kement hag *i* gallek, nemet e reer ganto ivez da verka *i* kensonenn pe *yod*, evel ma lavar ar soniadourien.

u a dalvez kement hag *u* e galleg. Nemet en Diellou ma 'z eus warno hepken levezon al latin e talvez kement hag an *u* latin, da lavaret eo *ou*.

Ret eo teurel eyez ouspenn e c'hell e silabennou evel *guen* talvezout *u* da lavarout *gen* kenkoulz ha *gwen*, dre ma n'implij ket skridoù a zo *uu, uv, w* evit arouezia ar son merket gant *w* saoz.

2. AN DIOUVOGALENNOU.

ae ne deo ket hepred diouvgalenn er pevarzekvet ha pemzekvet kantved. Diwezatoc'h e talvez a-wechou kement hag *e* digor.

eu a c'hell beza distaget evel *eu* gallek pe *ew*, hogen ouspenn *eü*, evel en *eürus* hag *ev* evel e *leurer* = gall « *lévrier* ».

ue a c'hell talvezout kement hag *eu*.

eo, trede person ar verb *beza*, a c'heller kavout skrivet *eo*, *eu* pe *e*.

-eo a c'hell c'hoaz beza skrivet *eau*, evel e *bleau*, *eteau*, *reau*.

ou a c'hell beza unvogalenn pe ziouvogalenn, da skouer *louenas*, distaget *lowenas*.

o a gaver e kichen *ou* unvogalenn, da skouer : *goulou*, *golou*, *golo*.

caffaus, distaget *kañvaou-us*.

aw a vez skrivet *au* hag *aou*, hag ivez *ao*, *ó* evel e *taol*, *taul*, *tól*, *taoul* = gall. « *coup* ».

au a c'hell talvezout *äü*, da skouer : *cassaus*, *hoan-taus*.

e gerioù evel *garu*, *hanu*, *mezu* an *u* ne deo ket an *u* gallek. Talvezout a c'hell kement hag *w* : *taruu*, *garuu*, *maruu*, *leshanvu*.

u a c'hell talvezout *ou* evel e *hanou* = ano.

u a c'hell talvezout *v*, skrivet *f* evel e *barf* = baro, *hanff* = hañv.

Deut eo alies da veza *o* er yez komzet : *hano*, *garo*, *maro*, *huero*.

Salu en deus eun eil furm *sal*. *Saluder*, *garuder*, *hueruder* a zo anezo gerioù diouasilabennek ha nann teir silabennek.

Notenn. — Evit diforc'h etrezo silabennou ez eus bet graet gant an daou bik, da skouer *groaï* = gray, pe gant eun *h*, da skouer : *nerahint* = ne raint.

3. KENSONENNOU.

l, n a c'hell beza kensonennou glebiet. Skrivet e veze *l* glebiet gant *ll*, da skouer : *boutaill*.

n glebiet a veze skrivet e meur a zoare : *dign* pe

din ; pignat, pinnat, quinhenn, quinghenn ; pugnes, puignès.

n a c'helle talvezout ivez da verka vogalennou-fri dirak *f* ha *v*.

z hag *r* a c'helle ivez beza kensonennou glebiet, e gerioù evel *fizy*, unsilabennek (keñveria gant *fizia*), pe evel *discleri* eus *discleria*.

k bremañ a c'helle beza skrivet e brezoneg-krenn *c* dirak *o, a, u*, pe *k*, pe c'hoaz *qu* dirak *e, i* hag a-wechou *ae*.

g bremañ a vez skrivet *gu* dirak *e* hag *i*. E dibenn gerioù e c'hell talvezout kement ha *j* : *courdig, lig*.

h a dalvez a-wechou kement ha *c'h* bremañ : *huero*.

ch a dalvez a-wechou kement ha *c'h*, a-wechou all kement ha *ch* en *a-wechou*.

z a dalveze kement ha *z* gallek, da eil, *th* blot saoz, da drede, *th* garv saoz, *z* garo a veze skrivet *zz* pe *tz* : *razz, dinertz*.

d ha *z* blot a veze kavet an eil e lec'h egile : *Juzas* e kichenn *Judas*.

ff, fv, e dibenn eur ger, a dalvez kement ha *v*, en e raok, eur vogalenn fri pe, da nebeuta, hiraet. An arouez-se, miret en anioù tud hag en anioù lec'h, en deus lakaet an dud levezonet gant al lizerenneg c'hallek da zistaga a-dreuz anioù evel *Henaff*, distaget *henañ* gant ar vrezonegerien, evel m'eo *Creff* distaget *kreñ*.

c dirak *i* pe *e* a son evel *s* : *civellenn* = « senklenn », *certain*.

cc, cz, zc, ccz, zcc, czc ha diwezatoc'h *ç* a verk eur gensonenn distaget kreñvoc'h eget *s* gallek :

er ger *aç, açz, ac, acc*, eus ar galleg « assez », ez eo hervez Gregor a Rostren distaget startoc'h eget *s* hag

e talvez *ss*. Alies e vez en e raok evel eur gensonenn-fri : *hiñcza* = « isa », *mouçzelin* = moñselin.

4. KEMMADURIOU. DEROU.

N'eus da lavarout diwar o fenn nemet eun dra : n'eo deut ar boaz d'o skriva ingal ha piz nemet abaoe an Tad Maner. Kavet e vez lod anezo kentoc'h, nemet n'oa reolenn ebet o redia d'o skriva.

2. AR GER-MELL

1. E brezoneg koz ar ger-mell oa *en, -n* goude eun araogenn evel *do* « da ».

E brezoneg krenn e kaver c'hoaz ar furm *en* e kichen ar furm *an*. Kavout a reer ivez *-n* :

en meyn.

an bet

Doe-n Tat.

E brezoneg bremañ ez eo deut ar ger-mell da veza *an* dirak vogalenn hag ar c'hensonennou *h, d, t, n*. *al* dirak *l*.

ar dirak ar c'hensonennou all.

Notenn. — Hervez an Ao. Loth *n* ar ger mel a zo deut da veza *r* da genta dirak ar c'hemmadurioù c'houezadennet : *An hoarais* oa diaes da zistaga. Hevelep tra a c'hoarveze pa zeue eur ger gwregel o t-raoui gant *g* war-lerc'h ar ger-mell : *ar c'havr* pe gentoc'h *ar havr*. Marteze eo zoken dre ar furmou gwregel ez eo staget *an* da zont da veza *ar*.

2. Kavout a reer ar ger-mell teuzet gant eun araogenn e furmou evel : *en ti, el loar, er c'hoad*.

3. Ar ger mell amresis a zo *eun, eur, eul* e brezo-

neg bremañ. An hevelep ger eo hag *unan* nemet ne vez ket implijet *unan* dirak eun ano. E brezoneg krenn e vez skrivet *un, ung*.

4. IMPLIJ AR GER-MELL

a) dirak anioù divoutin, anioù-pobl pe anioù bro ne vez ket implijet dalc'hmat :

Dre Cristenez. A Egipt.

Da laquat sig oar Guengampis. Gw. 224.

b) a-wechou all e vez kavet :

An Saouson. Gw.

An Bretonet. Gw.

Brest ha Leon, han Porz-guenn. (han = hag ar).

b) pa vez eur renadenn war lerc'h eun ano, pe voutin pe zivoutin e ve, mar bez resis ar renadenn ne vez ket implijet ar ger-mell :

Euyt Ytron an Bretonnet. N.A. 290

Crouer an eff. Roe an Yuzevyon. J.

Kavout a reer ivez avat :

Dre an casty ho Pasion. N.A. 221

An marv a Jêsu. J.

Ha neket hepken er gwerzennoù, ma rank ar skri-vagner soñjal e klotennoù hag e niver ar silabennou, e vez kavet seurt implij :

Goulen a reomp ez ve roet deomp

an gloar hac an rouantelez an Neff Cat. J.K.

c) e brezoneg krenn e talvez ar ger-mell koulz e komz plaen hag e gwerzoniez, da verka eur renadenn en dro-belec'h :

An costez dehou assezas

De Doe ann tat holgaloedus. Cr.

*hac ez asez an tu dechou da doué an
tat holl-galloudec. Cat. J.K.*

d) Mar kaver ar ger mell implijet e-lec'h ne vez ket kavet hizio, diimplij ez eo ivez e lavarennoù ma vez graet gantañ hizio :

Huy a guelo oar an douar an guez

Discaret gant rust amser. Gw. 137-138

3. AN ANO

1. NIVER

Ret eo diforc'h evit an ano e brezoneg an « niver-stroll », an « unanderenn », an « niver-unan », an « niver-daou », al « liester ».

a) an « niver-stroll »

Pa vez eun ano en « niver-stroll » e talvez hemañ da « liester » :

guern, deru, fau.

En anioù-se e vez merket an niver unan en eur staga an dibenn-ger -enn ouz an niver-stroll :

guernenn, deruenn, fauen.

Eus ar furmou-se e vez graet an ano a *unanderenn*.

b) an « niver-unan »

Ar peurrest eus an anioù a c'heller renka en *niver unan*, hag al *liester* anezo a vez furmet e meur a zoare.

c) « liester ».

1. El « liester » e kemm a-wechou ar vogalenn e diabarz ar ger. An abeg d'ar furmou-se a zo kenta-tro lies an anioù en hen-geltieg.

Dindan levezon an dibenn-ger-se, daoust d'ezañ da veza kollet, a a zeu da veza e :

sant, sent ; gaffr, gueffr ; davad, deuget ; azrouant, ezreuent.

o a zeu da veza e

escop, esqueb, askorn, esquern ; abostol, ebestel.

a-a a zeu da veza e-e

asenn, esenn ; casec, quesec.

carrec, kerrec ; astell, aestell.

2. Er gerioù gant diouvogalennou *ae, oa* a zeu da veza *ei*

men (maen), mein ; dren (draen), drein ; oan, ein ; troad, treit.

3. *oua* a zeu da *e*

houarn, hern ; louarn, lern.

4. Levezon ar silabenn diweza kollet a c'hell sevel uheloc'h eget ar silabenn dosta :

crouc'hen, crechin ; croguen, creguin ; corden, querdin.

5. Al « liester » a c'hell beza merket ivez gant dibenn-gerioù. Niverus an dibenn gerioù-se :

a) *on, ion.*

lat. *latro* a ro *lazr* e brez. krenn

latrones a ro *lazon*..

anafuon ; disquiblion ; yuzevyon ; goas, gysion ; Saoz, Saozon.

Nemet e brezoneg Gwened ez eo deut peurvuia an dibenn-ger *-on, -ion* da veza *-ien* e brezoneg :

christen, chrystenien ; dleour, dleouryen ; pe-

chezr, pechezrien ; labourer, labourerien ; paour, paourien.

b) *-et* a zeu eus *-etes* gant vogalennou *berr* : *Namnetes* a ro *Naoned*. An dibenn ger-se a dalvez da verka liester an traou beo peurvuia :

anneual, anneualet ; merch, merhed ; loezn, loeznet ; pescq, pescquet.

E. *pesk-ed* an dibenna en deus eun orin all. Dont a ra ar ger eus lat. *piscatus*.

An dibenn-ger *-et, ed* a zo staget peurvuia ouz anoioù buhezged.

k) An dibenn-ger *-ou, -iou*, er c'hontrol, a verk liester anoioù traou divuhez peurliesia :

ilys, ilysou ; roed, roedou ; tra, traou ; dazr, dazrou ; iez, iecziou ; goel, goelyou.

d) An dibenn-ger *-i* el liester en deus levezon war silabenn diweza an niver unan :

cog, queguy ; gast, gisty ; taru, tirvy ; merdeat, merdeydy ; lestr, listri.

e) El liester, eur ger o tibenna gant *k* pe *g* a gemm ar gensonenn-se e *y, gy* dirak an dibenn ger lies :

belec, belegyen, beleyen ; ezommec, ezomeyen.

f) An dibenn-ger-lies *ez, deut* da *-e* alies hizio, a c'hell dont eus anoioù-stroll :

buguel, bugalez ; groec, groaguez ; ael, aelez ; autrou, autronez ; ti, tiez.

g) An dibenn-ger lies *-er, -ier* a zegas kemm alies e vogalenn ar silabenn araok :

cleze, clezeyer ; ialch, gelchier ; sach, syher ; traou, treuier.

h) Dibennou-geriou-lies all ez eus c'hoaz n'heller ket renka e-touez an doareou meneget betek-hen. Ret eo teurel ple ez eo an holl dibennou-se dilerc'hiou eus troadurioù aet da get. Lod eus an dibennou a zo en em skignet kalz pe nebeut er geriadur, lod all a zo chomet stag ouz eun ano hepken :

quy, con ; car, querent ; breuzr, breudeur.

i) Erfin evit anioù 'zo e vez graet o liester gant anioù all n'o deus tamm kerentiez outo dre ar wri-zienn :

den, tud ; quy, chas ; buoc'h, saout ; march, kezeg.

2. REIZ

Reiz gourel, gwregel, nep-reiz an anioù a oa merket gwechall dreist-holl gant dibenn an anioù gwan a zeue d'o heul. Kollet an dibennou, ne deo chomet nemet an efedou anezo war gensonennou derou-ger pe war vogalennou gwrizienn.

Ar gerioù nep-reiz a zo bet lodennet etre an diou reiz all. Setu m'eo tro gourel e kembr., gwregel e brezoneg ; *galar*, gourel e kembr. ha *glac'har*, gwregel e brezoneg. Eur ger zo e brez. n'oar ket c'hoaz pe reiz eo : ar ger *tra*. Lavarout a reer *an dra, eun dra vat*, evel ma vefe gwregel, nemet e lavarar ivez *daou dra, tri zra* evel ma vefe gourel.

3. DIVERADUR-GERIOU

Sed amañ roll ar penna dibenn-gerioù en anioù diheverz pe droadel, A :

1. **-akta* a ro *-aez, -ez*.

hiraëz, gonideguez, losquidigaez, doeëlez, entre-lazidigaez, pesquezez, marchadourez.

-iëz, -yez.

mezeguez, goasoniez.

-nez.

ancoffnez, lojrnez, furnez.

-elez.

madaelez, santelaez, priédelaëz.

2. *-at, -ad.*

bagat, dournat.

3. **-at-* a ro *-et*

peched.

4. **-tero-* a ro *-der.*

caleter, sclader, hirder, lemder, duder, guenn-der, berrder, douzder.

5. **-tat-* a ro *-det.*

guerchdet, trindet.

6. *-itas* a ro *-et.*

sechet.

7. **-iia* a ro *-ez.*

truez, trugarez, guirionez, larguentez.

8. *-i.*

glisi, dieuguy.

-inti.

mezuinti, merzerinty.

9. *-yat.*

doubloazyat, gourhizyat.

10. *-ent.*

badizyent, squient.

11. *-ni.*

crezni, cozni.

-oni.

cassoni, sotony.

12. -our.

gluebour.

13. -adur.

gluypiadur, guisquadur, pligadur.

14. -ancc (= *ans*).

fizyancc, credancc.

15. -entez.

falsentez, paourentez.

B. En anioiu person pe micherou :

1. -adour, eus lat. -*ator*.

marchadour.

2. -ezr, eus lat. -*ator*.

pechezr, pesquezr, guinhezr.

3. -er, eus lat. -*arius*.

alhuezer, barner, baraer, clocher.

4. -our.

badezour, achantour, prezegour.

5. -e.

kere.

6. -yat.

quinyad, dibryat, gouzyfyat.

4. AN ANO GWAN

1. E brezoneg ez eo deut an ano-gwan da veza digemm e-keñver « niver » ha « reiz ».

E brezoneg koz e kaver skoueriou eus « liester » an ano gwan :

blinion (g. spisa « inertes ») *buenion* (g. sp. « con-
citis »).

Hevelep tra evit ar « reiz ». Kavout a reer, e Diel-
ladur Redon, anioiu gwazed evel

Uuinhael, Uuinhoiarn, Uuinmael,

e-kichen anioiu merc'hed evel

Uuenbrit, gwreg ar Roue Salauin.

Uuentamau, gwreg Carantcar ;

a-wechou-all avat e kaver *Uuën*- ivéz e anioiu-
gwazed : *Uuenmael.*

Ar furmou-se evelato a zo da geñveria gant ar
furmou kembraek :

gwyn, gour., gwen gwr., gwynion lies.

2. SKEUL AN DOAREA.

Diforc'h a reer an *derez-plaen*, an *derez kevatal*
an *derez-keverata*, an *derez uhel*.

1. An derez kevatal

a) Merket oa gant an dibenn-ger -(h)et evel e
kembraeg :

Dre an dramañ hanvet, *goazhet* bell !

Myl conscyancc so en brancel P.B. 266

Pan voa ganet Roue an bet, *guelhet* tra !

R.C. XII. p. 51

Dez mat golou, knech, tnou, louen

D'an mab beniguet, *cazret* den !

R.C. VIII p. 410.

Evit gwir ez eo deut da veza er skoueriou-se eun
derez-estlamm, evel hizio gant an dibenn ger -*at*.

b) An derez-kevatal a vez merket e gwirionez gant
an araogenn *ken* dirak an ano-gwan :

quen quen ha'n erch,

quen cuff ha quen vuel N.A. 11, 6.

k) Kavout a reer *ken* kevredet start e gerioù evel *quement, quencouls, qerqent*.

e) Teurel ple ouz lavarennou evel
ma quen drouc ; da quen bilen ;
e quen nobl ; houz quen iotls.

2. An derez-keverata

a) An dibenn-ger keverata oa en indezeuropeg-jos.
Sellit ouz lat. *senior*.

b) E brezoneg krenn e kaver furmou o tont eus
doareoù koz da sevel an *derez-keverata* :

*maro- brez. *meur* der. kever. *mui*
brez. *yaouank* — *yaoua*

Dibenn-ger an ano-gwan en derez-plaen a gouez
en derez-keverata.

k) Gerioù 'zo o deus kemeret eur ster keverata
evel *quell, goaz, quent*.

d) An dibenn-ger keverata a zo e brezoneg-krenn
-och.

bras, brassoeh ; pell, pelloch.

e) Stageta a vez zoken eus furmou a oa gwechall
anezo dereziou-keverata :

<i>hir</i> (eus *sero-) zo deut da veza <i>hiroc'h</i>	
<i>nes</i> — <i>nesoc'h</i>	
<i>quell</i> — <i>quelloch</i>	
<i>goaz</i> — <i>gwasoc'h</i>	
<i>mui</i> — <i>muic'h</i>	

f) renadenn an derez keverata a zo bleniet gant ar
stagell *eguet, eguit*.

3. An derez uhel.

An dibenn-ger anezañ en hen-geltieg oa *-samo-*.
Deut eo da veza e brezoneg-krenn *-af -aff, afu*, dista-
get evel *añ*. An *-s-* eus *-samo-* en deus roet e prede-
neg *-h-*, da skouer :

kembr. *muyhaf* brez. *querhaf*.

Al lizerenn-se kouezet eo he deus kaletet ar gen-
sonenn *araok* :

braz, brasa ; koz, kosa.

4. Ar skeul doarea reiz a zo merket evelhen e bre-
zoneg krenn :

1. <i>abil</i>	2. <i>abiloch</i>	3. <i>abilaff</i>
<i>bras</i>	<i>brassoeh</i>	<i>brashaf</i>
<i>cazr</i>	<i>carroch</i>	<i>caezraf</i>
<i>hen</i>	<i>henoc'h</i>	<i>henaf</i>
<i>garv</i>	<i>garvoc'h</i>	<i>garvhaf</i>
<i>uhel</i>	<i>uheloch</i>	<i>uhelaff</i>

5. AN NIVERI

I. — 1. *un, ung* ne vez kavet nemet dirak eun ano.
Deut eo da veza e brezoneg ar ger-mell amresis *eun*,
eur, eul.

Setu un feunteun eyennet.

unan eo ar ger niveri dizalc'h.

Neuse unan gand despit a respontas.

Kevredet gant ar perc'henna e teu da ober raga-
noù :

ma hunan, da unan, e hunan,
hon unan, hoz unan.

Kevredet e c'hell beza ivez gant raganoioù amre-
sis :

pep unan, quement unan so ahanech.

E brezoneg-krenn e kaver ivez un implijet en he-
velep doare :

pep un, a un da un,

un ann ez-he.

2. *dou, daou gour.*

diu, diou, dieu, deu gwreg.

Kavet e vez o teraoù gant eun *n-*, goude ar ger-
mell an :

an nou, dan naou glin.

3. *tri,*
teir, teyr.

4. *peuar, pevar.*
peder, pedeir.

5. *pemp.* — 6. *huech.* — 7. *seiz.* — 8. *eiz.* — 9. *nau,*
nao. — 10. *dec.*

11. *unnec.* — 12. *douzec, daouzec, daoudec.*

13. *trizec, tryzec, triezec.*

14. *peuardec, peuarzec.*

15. *pempzec, pemzec, pemsec, pemdec.*

16. *huezec.*

17. *seizdec, seittec, seitec.*

18. *eizdec, eittec.*

19. *nauntec.*

20. *uguent.*

21. *onan oarnuguent.*

22. *douoarnugent.*

24. *peuar varnugent.*

30. *tregont, tregond.* — 31. *unan ha tregont.*

40. *dou ugent.* — 41. *unan ha dou ugent.*

50. *hanter cant.* — 51. *unan ha hanter cant.*

60. *triugent.* — 61. *unan ha triugent.*

70. *dec ha triugent.*

80. *peuarugent.*

90. *dec a pevar ugent.*

100. *cant.* — 101. *unan ha cant.*

200. *dou cant.* — 300. *try cant.* — 500. *pemp cant.*

1000. *mil, myl.* — 10000 *dec mil.*

100000. *cant mil.*

II. An niverou pegementi a zo anezo anoioù gwan,
nemet *unan* a vez implijet dizalc'h.

Implijet e vezont ivez evel anoioù outo eur rena-
denn bleniet gant an araogenn :

seiz a vugale.

III. An anoioù e brezoneg krenn evel e brezoneg
bremañ a chom en niver *unan* goude an niverou.

IV. En niverou lies-kevrennek e vez lakaet an ano
goude an niverenn genta.

dec guez ha triugent.

V. An niverou petvedi, nemet ar pevar c'henta, a
zo furmet en eur staga *-uet, -et* ouz an niverou pe-
gementi.

1. *quentañ.* — 2. *eil.* — 3. *trede.* — 4. *pevare* hogen
pedervet er furm gwregel.

5. *pempvet.* — 6. *huechuet.* — 7. *seizuet.* — 8. *eiz-*
vet. — 9. *navuet.* — 10. *decuet.* — 30. *tregontuet.* —
100. *cantuet.* — 1000. *milvet.*

VI. Diouz an niverou ez eo deveret anoioù d'ezo
eun dalvoudegez pad.

doubloazyat.
trybloazyat, trighuizifyat.
tridezzyat, tridezguizyat.
trimisyat.

6. AR RAGANOIOU

1. AR RAGANO-GOUR

1. Furmou.

	1 un.	2 un.	1 l.	2 l.
dizalc'h	me	te	ni, ny	hui, huy
enharpell	-me	-de	-ni	-huy, -hu, -uy, -u
enger	-m-	-z-	-n-, -on-, -hon-	-oz-, -(h)ouz-, -ho(z)
gourfenger	-ff	-t	-mp	ch
tro-c'henel sujet	ma, va, Gw. me	da	on, hon	oz, ouz, hoz, houz, ho.
tro-c'henel sujet goude araogenn pe stagell	-m	-z	-n, -on	-oz, ouz.

	3 un. gour.	3 un. gwreg.	3 lies
dizalc'h bag enharpell	eff,	hi, hy	y
enger	-en-, -hen-,	-he-	-ho-
gourfenger	-(h)aff	-(h)i, -zi	-(h)e, -(h)o, -ze, -zo
tro-c'henel sujet	e	he	ho
tro-c'henel sujet goude araogenn pe stagell	-e	-e	-o

2. *Implij.* — 1. Er yezou keltiek e vez merket person ar verb gant eun dibenn-ger. Setu perak ne vez kavet ar ragano person evel tro-rener nemet er furm dizalc'h.

2. Ar furmou enharpell trede person a vez kavet evel renadenn goude ar verbou en doar-gourc'hemenn :

*cret ef
leset hy*

3. kavet e vez furmou enharpell evel furmou-poueza goude ar verbou pe an araogennou displeget :

*deoch huy.
maz, caremp ny.*

4. Ar furmou engender a vez kavet goude ar rannouigou-verb *a, e, ra*, ha goude ar gerioù nac'h :

Doe ra-m pardono.

me az guel

pan em ganat (= pa voen ganet)

5. Ar rannouigou verb a gouez dirak furmou an dro-c'henel sujet implijet dirak ar verb :

ef on care

6. Dre m'eo heñvel ar furmou enger lies kenta hag eil person ouz furmou an dro c'henel sujet e teu ar furmou unan kenta hag eil person da veza implijet dirak ar verbou en doare gourc'hemenn :

hon sicour

ma sicour

hoz em lemet

da em lam

7. An dro c'henel sujet goude araogenn pe stagell -m, -z a gaver goude

a (= eus) da , e , ha , na :

ha-n curun flam a-m penn e-m clem eff he tennas.

Mir. M. 281.

da-z map.

ma map ha-m tad ha-m croeadur

na me na-m deffuet.

8. Furmou ar ragano-gour enger hag en dro c'henel eo a vez implijet evit ar perc'henna :

Ma mamm ; dre e douclder ;

On Roe deboner ; en hoz fryou ;

Sae a-m foll ;

darn a-z secret ;

e-m quiryonez ;

e-z quichen ;

9. Da raganoioù perc'henna e reer gant an anoioù-

gwan perc'henna : *ma, da* h.a. ouz o heul ar ger *heny* en niver unan ha *re* en niver lies :

ma heny-me ;

10. Ober a reer ivez gant ar ragano displeget da verka ar perc'henna :

an ornamentou anezaff ; an gouuizeguez a hanot ;

2. AR VERB KAOUT E BREZONEG

Displeget e vez gant furmou eus *beza* ha raganoioù enger.

DOARE DISKLERIA

AMZER VREMAN : unan : 1. *em-eus, me am-eux ;*
2. *az eux, aheus, ez eux ;*
3. *en-deveux, he deveux*

lies : 1. *hon eux ;*

2. *hoz eux ;*

3. *ho deveux ;*

AMZ. BREM. BOAS unan : 1. *em bez ;*

2.

3. *en devez ;*

lies : 1.

2. *ho bez ;*

3.

AMZER DREMENET : unan : 1. *am oa, em oa ;*

2.

3. *en devoa, en devoe, en doa ;*

lies : 1. *hon oa ;*

2. *oz oa ;*

3. *ho devoe ;*

AMZ. DREM. STRIZ unan : 1. *em boe ;*

2. *az voe* ;
 3. *en deffoe, he devoe* ;
 lies : 1.
 2. *oz boe* ;
 3. *ho deffoe* ;
 3. *en divise.*

AMZ. PEURDREMENET unan : 1. *ham bezet* ;
 DOARE GOURC'HEM unan : 2. *haz vezet* ;
 3.

- lies : 1. *hon bezet* ;
 2.
 3.

DOARE SUJA. AMZ. unan : 1. *am bezo, em bezo* ;
 VREMAN 2. *az vezo, ez vezo* ;
 3. *en devezo* ;

- lies : 1. *on bezo* ;
 2. *oz bezo* ;
 3.

AMZER DREMENET unan : 1. *am be, em be* ;
 2. *nez ve* ;
 3. *en deffe* ;
 lies : 1. *on be* ;
 2. *ouz be* ;
 3.

Ar verb-se a zo bet staget outañ a-wechou dibenn
 gerioù-person, da genta en doare-gourc'hemenn :
Crist haz uez trugarez ouzimp.

3. AN ARAOGENNOU DISPLEGET

Eu eur staga raganoioù gourfennger ouz arao-
 gennoù ec'h eus bet aozet e brezoneg raganoioù nevez :

	oar	gant	ouz	da
unan 1.	<i>oarnouf</i>	<i>gueneff, -fu</i>	<i>ouziñf, -fa</i>	<i>diff, difu</i>
2.	<i>oarnot</i>	<i>guenez, guenet</i>	<i>ouzit</i>	<i>dit</i>
3. gour.	<i>oarnezañ</i>	<i>gantañ, -añ</i>	<i>outañ, -fu</i>	<i>dezañ, -fu</i>
gwreg.	<i>oarnezi</i>	<i>ganty</i>	<i>outi</i>	
lies 1.	<i>oarnomp</i>	<i>guen(e)omp</i>	<i>ouziñp</i>	<i>deom(p)</i>
		<i>guenemp</i>		<i>dimp</i>
		<i>ganeomp</i>	<i>ouziomp</i>	<i>dym-ny</i>
2.	<i>oarnoch</i>	<i>gueneoch</i>	<i>ouziñch</i>	<i>dech</i>
		<i>guenech</i>	<i>ouziñch</i>	<i>dich-uy</i>
			<i>ozoch</i>	
3.	<i>oarneze</i>	<i>gante</i>	<i>oute</i>	<i>deze, dezo</i>

Kavout a reer displeget war skouer oar :

a : *ahan-off, -ot, anez-aff, -y* ; lies 3. *aneze.*

davet : *daved-ouff, dauetañ, daguitty, davyty* lies.

2. *daved-oc'h, -ouch* ; 3. *davede.*

dirac : *dirazoff ; dirazaff ;*

dre : *drezoñff, dreizoñff ; dreizoude, gant ar ragano*
enharpell -de ; dreizañff, dreizy ; dreiz-och, -ouch ;
dreize.

eguit, evit : 1. *eguid-off, afu, eguytdouff, evidoff ;*

2. *eguidot*, 3. *eguitañff, euitañff, eguythy* lies. 1. *egui-*
domp, euidomp ; 3. eguite.

en : 1. *enouf* ; 2. *ennot* ; 3. *enhaff*, *ennaff*, *enhy*
lies, 1. *enomp* ; 2. *enoch* ; 3. *ennehe*.
entre : *lies*, 1. *entromp* ; 2. *entroch* ; 3. *entreze*.
eguet : *eguedoff* ; *eguedot*.

4. AN DISKOEZA

1. Ar ger-mell, *en* e brezoneg koz, *an*, *en* e brezoneg krenn a zo d'ezañ eun dalvoudegez diskoueza. Aet war wanaat ez eo deut gerioù all d'e harpa : *-mañ*, *-se*, *-hont*.

2. Diouz ar pennef diskoueza ind. eur. **so* eo deut e brezoneg krenn :

1) *ho-*, e *ho-n*, *ho-z* ;

2) *he-*,
en he-vlene ;

3) *se*, implijet da harpa ar ger-mell :
an cleze se ;

pe war-lerc'h araogenn :
evel se ;

pe evel rener ha renadenn :
gouvezet se, *credet se*.

4) *henn*
evel-henn
he-man, *homan*, *homan*, *houman* ;
henez, *honnez* ;
hen hont, *hennont* ;

3. Furmi a reer eur ragano diskoueza *lies* gant *ar re* :

an re-man, *an re-se*.

4. Gant ar ger mell *an* ha *heny* :
Foll eu an heny na study se.

Heny a c'hell beza implijet e-unan :
malloz doe... ha heny Juzas.

5. Furmou o teraoui gant eur vogalenn a zo anezo gerioù-diskoueza, da skouer :

eil o tont eus eur pengef **aljo-*

Implijet eo bremañ e brezoneg evel niver petvedi.

Strollet gant *peb*, e teu da c'her-lodenni :

peb eil deiz.

6. Da verka « unan a zaou » e reer gant *an eil*, da genta tro, ha da c'houde, evit ar reiz gourel, gant *e-guile*, evit ar reiz gwregel, gant *he-ben*. Skouerioù a gaver avat eus *e-guile* evit an diou reiz :

a on queffrann heguile C.

7. E-kichen *e-guile*, *he-ben* e kaver *all*, *arall* :
an eil hac an all.

8. Diouz eur ger-diskoueza o teraoui gant *k-* e teu ar brezoneg *quen* :
tra quen.

5. AR GOULENNATA.

1. Evit goulenn e reer

1) dizalc'h gant *piou*, pe eeun e ve ar goulenn pe dizeeun :

a) *Piou oude* ? J. 18

Piu vezo oz dilivro huy ? J. 22

b) *goulen ha desqc piou eo an puyantaff entre en oll re...* S. C.

2) dirak eun ano, gant pe hep araogenn, pe eur ragano ec'h implijer *pe* :

a) *pe marchadouryen* ?

b) *pe dre hent* ?

k) *pe heny ? pe a heny ?*

Pe re ?

e) koulskoude : *pe leveret-hu* ? B. 133

3) ar ger *pe* a gaver strollet gant geriou all evit
aoza geriou nevez goulennata :

pebez ? pezh ?

pe eur ?

pe rac tra ? pe en lech ?

pe a lech ? pe lech ?

pe-guement ?

pe-guen-calet ?

pe-ban ?

penaux ?

4) gant ar ster niveri e kaver *pet* :
pet quez ?

5) Evit goulenn e kaver ivez ar stagellou *a*, *ac* *pe*
na, *nac* :

A me nam eux lech da nechif ? J. 21

Ac eff a fell muy dihuy quen ? J. 49

Nac eguyt se ? J. 117

Na noz bezo choas ? J. 132

6. AN AMRESIS

1. Kavout a reer ar ger *pennac* strollet gant geriou
goulennata :

1) *piu pennac* ; (= gal. « quiconque »).
pëtra pennac ; (= « quoi que ce soit qui »).

penaux pennac ; (= malgré cela »).

2) strollet gant *un* hag eun ano :
un lechic pennac.

2. *Nep* en deus eur ster tost a-walc'h a-wechou :
nep a lavare compsou all (= lavarfe)

a-wechou all, ez eo eur ragano diskoueza :

Doe nep am croeas. N. 1007.

Implijet e vez evel ano-gwan ivez :

Mir no torry dre neb labour. M.B.H. 17.

3. *Pep* a gaver dirak eun ano :

pep pechet ;

strollet gant *unan* *pe un* :

Gant pep unan ez ouf anvet ; J. 89a

Pep un darn. B.B. 416

gant *heny* :

Ez dle pep heny

Goelaff a devry ; J. 3a.

gant *re* :

dreiz pep re. P.B. 20.

Pep a c'heller kavout ivez strollet gant eun arao-
genn evit talvezout da c'her-lodenni

Pep a carter B.B. 24.

An hevelep ger eo a gaver e
pepret, *pemdezh*.

4. *Quitibunan*, *guyteb-unan*, *guitib-unan*, *guyteb-*
un-tamm a dalvez kemet hag « holl betek an hini
diweza ».

Monet saccun guytibunan

D'an Barados d'an reposuan. Chr. B. 301

Er ger kevrennek-se e kaver da lodenn genta eur
ger a zo an hevelep hini ha *quet* e

quet-breuzr (= « confrère »).

5. *Oll a-zeu diouz eur penngef diskoueza. Bez' e vez kavet e-unan :*

Quement am eux... a roaf oll, J. 99 ;

Ed oll en maes, B.N. 513.

Kavet e vez ivez gant ar ger-mell evel eun ano-gwan, pe dirak eun ano :

Paeaf oll die an-holl bet, J. 44 ;

pe c'hoaz dirak eun ano-gwan :

holl-galloudus ;

pe gant eun ano gwan en derez uhela :

ar brassa oll.

Ster *an oll, en oll* a c'hell beza « a-bez » :

An oll ma holl joa ne moa muy, J. 130 a.

6. *un re* = « unan bennak ».

nep re = « nikun ».

pep re = « an holl ».

an hol re = »

dreis pep re = « dreist-holl ».

7. *Seul* a c'hell beza ragano :

Seul a anquen hac a penet

A gouzafvet oar an betman J. 125a

Kavet e vez evel ano-gwan :

Pap Sixt VIII en deueux autreet da neb a lauaro an oreson man un nçc mil bloaz a pardon seul guez ma he lauaro. M.B.H. 82.

Peurvuia e vez implijet evel rakverb dirak an derez-keverata :

Seul muy oarse so a pechet

Seul muy poan racse so dleet, J. 68 b

Talvezout a ra *seul* da sevel eur stagell gant *ma* :

Seul maz vezaff, B.B. 199

8. *Un nebeut* a vez implijet kentoc'h evel rakverb :

Cleuet un nebeut, ma breudeur, P.B. 139

7. AR STAGA

1. En daou rumm yezou keltiek ez eus eur c'hemm a bouez en islavarennou-staga, diouz ma vez ar ragano-staga pe ger-rener pe renadenn, pe diouz ma vez eus an islavarennou-se renadennoù dieeun.

2. Roudou ez eus eus raganoioù staga gourfenniger pe enger e brezoneg krenn :

me s-o

3. Ar ragano staga boas e brezoneg avat a zo *a* en is-lavarennou-ya.

En is-lavarennou-nann e vez graet gant *na* :

Ne gonn en noar pe a graff, B.N. 20.

Unan na duy B.N. 28.

4. Pa vez eus an is-lavarennou-staga renadennoù di-eeun e reer gant *e*, ez :

Nen deu quet dre humanitez ez eu gouarnet ho chastetez, M.B.H. ;

5. pe gant *ma*, *maz* :

maz rentimp deoch enor, M.B.H. 2 ;

an bez maz oae laquat, P.B. 124

6. pa'z eus eun araogenn araok ar ragano-gour staga, e reer gant *maz* (= *ma ez*) :

Dren curun spern maz uoe cernet e pen, M.B.H. 45 ;

7. Kavout a reer ivez ar ragano-gour goulennata heuliet gant eun araogenn :

Dren marv pe gant ez marvas, J. 64.

8. Ar ragano-staga brezonek ez a zeu eus eur furm rakverb **idhe*.

9. Ar ragano-staga gourfennger a zo anezañ -o er brez. *s-o*.

10. Ar ragano-staga a zo manet e brez. en is-lavarennou-staga eeun a zo *a*.

11. Pa'z eo ar ragano-staga ar ger-rener, ar verb a van en 3 p. unan :

A me a dle ober en dra se, J. 59.

Han dazrou gloeb a gulchy dyen ho eneb, M.B.H. 45. 14.

12. N'eus ket chomet a gemm e brezoneg etre a ragano staga hag a rannig-verb pa zeu ar ger-rener pe ar renadenn araok :

Mè a gourchemen

He mestr he les he-hunan hac a ya, B. 125

7. AR GERIOU-NAC'HA

1. Er penn-lavarennou e vez graet gant *ne* :

2. Evit azlavarout an nac'ha e vez graet gant *na* dirak kensonenn gant *nag*, *nak* dirak vogalenn :

3. Evit lavarout nann en eun is-lavarenn-staga, e reer gant *na* :

Unan na duy B.N. 28 ;

loae... nac eux fin dezy B.B. 789.

4. *na* a zo implijet alies er respontou :

Y ouz banisso. Na raint quet.

5. *na* a gaver dirak an doare gourc'hemenn :
na vez, B.N. 615.

na ehan quet, B.N. 10.

6. Ar skridoù kosoc'h eget ar seitekvet kantved ne ziskouezont ket d'eomp eur ger par da « non, nenni » e galleg. Ober a raed e brezoneg-krenn gant eur verb ha gerioù-nac'ha :

a) *Ha huy he guelas hy ?*

Ne guilis ket B.B. 362

b) Ar verb *ober* a c'hell kemer lec'h an hini-kenta :
Ten amanto ? Na rin quet.

k) Kavout a reer ivez ar verb *bout*, *beza* :

Andeu ? Andeueff ? (= hag ez eo heñ ?)

Ne deu quet.

7. *Nan*, *nann*, a c'hell beza deut diouz gerioù-nac'ha azlavaret, evel ma c'hoarvez alies e brezoneg-krenn :

Na nac oant.

8. AR RANNIG KENTVERB

1. Meneg a zo bet araok eus ar rannigou-verb *a*, *e*, *ez* ; hogen er yezou keltiek ez eus rannigou kent-verb d'ezo eun dalvoudegez all. Ne van nemet unan e brezoneg, ar rannig *ra*, deut eus *ro*, hag ivez *da*, deut eus *do*.

2. Talvezout a rae da rei d'ar verb liou an amzer dremenet striz. Skouerioù a gaver eus kement-se en henvrezoneg :

ro-luncas, g. sp. « guturicavit ».

ro-gulipias, g. sp. « olivavit ».

Kavout a reer e brez.-krenn : *quentre-caras* = ker-kent ha ma...

3. E brezoneg-krenn hag e brezoneg bremañ ne van d'ezañ nemet an dalvoudegez heti :

Deut mat a devry ra vihet, J.

4. Ar raganoioù gour enger a vez lakaet war e lerc'h

Doe ra-m pardono, B.N. 200.

Hoz peuch ron bezo, J. 50 a.

5. Ne vez kavet *ra* nemet el lavarennou-ya.

9. AR VERB

1. DISPLEGADUR PERSONEL : *Caret, Gallout*.

Doare-diskleria Amzer-bremañ	Doare-divizout Amzer-bremañ	Doare-gourc'hemenn Amzer-bremañ
<i>caraff querez car queromp queret, quirir queront</i>	<i>guillif guilly gallo guethomp guethet galthint</i>	<i>car caret queromp queret, quirir carent</i>
Amz. amdremenet	Amz. amdremenet	Displegadur c'houzañv-dic'hour
<i>carenn cared care caremp carech carent</i>	<i>galthenn galhes galhe galhemp galhech galthent</i>	<i>A.B. carer A.A. caret A.D. carat A.P. carset doare divizout A.B. carher. A.A. carhet</i>
Amzer-dremenet	Amzer-dremenet	
<i>quiris quersot caras quersomp quersoch quersont</i>	<i>carsenn carsed carse carsemp carsech carsent</i>	

2. Reiff.

doare-diskleria

Amzer-bremañ	<i>amzer amdrem. 3 p. un : re</i>
<i>roaff, rof</i>	<i>Amzer drem. 3 p. un ros, roas</i>
<i>rez</i>	<i>Amzer drem. diberson roet</i>
<i>ro, re</i>	<i>Amz. peurdrem. lies 2 rosech 3 rosent</i>

doare-divizout

Amzer-bremañ	Amzer-amdremenet
<i>reiff</i>	<i>rohen</i>
<i>rehomp</i>	<i>rohech</i>
<i>rehet</i>	<i>rohent</i>
<i>roy</i>	<i>rohe</i>
<i>diberson. roher</i>	

doare-gourc'hemenn

<i>reomp</i>
<i>ro</i>
<i>roit, reit</i>
<i>roent</i>

Ano-gwan verb :

roet

3. Bout, Bezout, Bezaff.

doare-diskleria

Amzer bremañ	Am. boas.
<i>ouff, of</i>	<i>bezaff</i>
<i>out</i>	<i>bezez</i>
<i>eo, eu</i>	<i>bez</i>
<i>gouz. dibers. eur,</i>	<i>hezont</i>
<i>edoff</i>	<i>gouz. dibers. bezer</i>
<i>edout</i>	
<i>edy</i>	
<i>ynt, edynt</i>	
<i>e mahint</i>	

Amzer amdremenet	Amzer dremenet
oann	oamp, edoamp
oas	oach
oa, edoa, edo	oant edoent
hoas : beze	edont
g. dibers. oat	

Amzer peurdremenet	
1. bihenn	bihemp
2. bihes	bihech
3. bihe	bihent
bye, bise	bisent

Doare-divizout

Amzer bremañ	Amzer amdremenet
beziff, biziff	bezimp, bizimp
bezy, bizy	bizhyt, bezot (bihet)
bezo	bizint
g. diberson : bezher, biher	

Doare-gourc'hemenn	Ano-gwan
bezomp	bezet
bez	bet
bezet	
bezant, bent	

VERBOU KEVRENNEK GANT *bout* HAG EUN ARAOGENN

I. — *hoarvout, darvout (darvezout)*
ambout (hambout, hanbout).

1. a) Doare diskleria : Amz. Brem. 3 p. un : *hoarvez*
Amz. Drem. 3 p. un : *hoarvoe*

b) Doare divizout : Amz. Brem. 3 p. un : *hoarvezo*
Amz. Amdrem. 3 p. un :
hoarffhe, hoarfe ;

k) Ano-gwan verb : *hoarvezet, hoarueset.*

2. *d-ar-vout, d-ar-vezout*
dareu, dare, deut da veza e brezoneg eun ano-gwan
a oa eun 3 p. un eus an Amz. Vrem.
darevet, ano-gwan-verb.

3. *ambout, ham-bout, han-bout*, ne dalvez mui ne-
met kement hag an ano « stad ».

II. — VERBOU KEVRENNEK GANT *bout* HAG EUR
WRIZIENN-VERB ALL.

1. *gouzuout, gouzout.*

doare diskleria

amzer bremañ	amzer amdremenet
gounn, gonn	gousomp
gousot	gousoch
gor, goar	gousont
dibers. gous	
hoas 1 p. un.	gouezaff

doare-divizout

amzer breman	amzer amdremenet
gouiziff	gouezimp
gouzezy, goufesy	gouzvihet
	gouviet
gouzezo	
dibers. gouzezher	

doare gourc'hemenn

2 p. un. *gounez, gouzuez* 2 pers. l. *gouzezet, gouezet*
ano-gwan-verb : *gouzezet, gouezet*

2. *aznauout, aznaout.*

d. diskleria a. br. 1 p. un. *aznauaff* ; 3 p. *ezneu*.
a. dr. 3 p. un. *aznauo*.

d. divizout a. br. 3 p. un. *aznauezo, annauezo*.
2 p. lies. *azna-vihet*.
a. amdr. 3 p. un. *aznaffe*.

ano-gwan-verb : *aznavezet*.

3. *deur-vout.*

amz. brem. *nem deur, non deur, noz deur, no deur*
quet.

diberson *ne deuteur quet* 3 p. un gwr.

am. amdrem. *nem deurie*.

am. dremen. *en deurfœ, deuzrvoe, n'o deurvœ, ne deuruo*.

doare divizout. am. brem. *deurffe, deuzrffe*.

amz. drem. *deurvihe*.

4. *tal-uout.*

amz. brem. 3 p. un. *tall, na dall*.

5. Evit ar furmou a dalvez da zisplegadur d'ar verb
KAOUT hag ivez da furmou ar verb skoazell e dis-
plegadur ar verbou oberiant, sellout : *Ragano gour* :

3. *Ar verb kaout*, p. 59.

4. *Monet, mont.*

doare-diskleria

amz. brem.	amz. amdrem.	amz. drem.	amz. peurdrem.
<i>aff eomp</i>	<i>aenn aemp</i>	<i>yz ezomp</i>	— —
<i>ez et (aet)</i>	— —	— —	<i>azes</i> —
<i>a eont</i>	<i>ae, yea</i> —	<i>eaz, aez, ezont</i>	— <i>azyent</i>

doare-divizout

<i>iff a(h)imp</i>	<i>ahenn</i> —		loare-gourc'hemenn	
<i>y, eheut (ehet)</i>	— <i>ahech</i>		<i>ēomp</i>	<i>que, quae it, et</i>
<i>ay ahint</i>	<i>ah</i> —		<i>aet</i>	—

ano-gwan-verb : *aet, eat*

5. *dont, donet.*

doare-diskleria

amzer bremañ	amzer amdremenet
deuaff —	duenn, deuenn
duerz duet	
deu deuont	due, deue
amzer dremenet	amzer peurdremenet
duiz —	deuzien —
deuzout deuzoch	— deuzech
deuz deuzont	deuzye deuzgent

doare-divizout

amzer breman	amzer dremenet
<i>duiff deuhymp</i>	— —
<i>duy</i> —	— <i>deuhech</i>
<i>dug, deug duhynt</i>	<i>deuhe duhent</i>

doare-gourc'hemenn

- | | |
|-----------------------------|-----------------------|
| 1. | 1. <i>deomp, demp</i> |
| 2. <i>deux, deuz</i> | 2. <i>deuet, duet</i> |
| 3. <i>deuet, deut, duet</i> | 3. <i>deuent</i> |

ano-gwan-verb : *deuet, duet*.

6. Ober.

doare-diskleria

amzer breman	am. andrem.
<i>groaff, graf, grueomp, graeomp, greomp</i>	<i>gren</i>
<i>gruez, grez, gruyt, graet, gret</i>	—
<i>groa, gra, grueont, greont</i>	<i>grae, grea, grent</i>
<i>diberson. graer, grer</i>	<i>dib. graet</i>

amzer drem.

amzer peurdremenet

<i>gris</i>	<i>gresomp</i>	<i>groasenn, grasenn, graesen</i>	<i>grasemp</i>
—	<i>gruesoch</i>	<i>grases</i>	
<i>grez</i>	<i>gruesont</i>	<i>groase, grase</i>	<i>groasent</i>
<i>guerue</i>	<i>gresont</i>		
<i>geure</i>			
<i>guere</i>			

doare-divizout

amzer bremañ

amzer amdremenet

<i>gruif, grif</i>	<i>groahimp, grahymp</i>	<i>grahenn, groahemp</i>
		<i>grahemp</i>
<i>gruy, gry</i>	<i>gruehet, grehet, grehent</i>	— <i>grahech</i>
<i>groay, greay</i>	<i>groaint, grahint</i>	<i>grech</i>
<i>gray, (g)rago.</i>		<i>groahe, grahe</i> —
<i>dib. graher</i>		<i>dib. groahet, grahet</i>

doare-gourchemenn

—	<i>grueomp, greomp, graeomp, gruemp</i>
<i>groa, gra</i>	<i>gruet, graet, gret, gruyt, gryt, grit</i>
<i>groaet, gret</i>	

ano-gwan-verb *graet, great.*

7. IMPLIJ AR VERBOU.

1. E brezoneg-krenn ez eus pemp giz da zisplega ar verbou en doare diskleria :

a) an displegadur personel taolennet er pennad 1 ;

b) an displegadur diberson, ennañ ar furm verb en trede gour e pep amzer. Merket eo person ar verb gant ar ragano-gour en e raok ;

k) an displegadur gant *bout* hag ar verb er stumm-ober :

Tut Iesu so oz concluañ. B. B. 25 ;

d) an displegadur gant an ano-verb hag *ober* evel verb skoazell :

Ma sintif groa, B. B. 225 ;

e) displegadur an ano-verb gantañ e-unan da verb skoazell :

Donet a duy, B. N. 291.

2. An daou displegadur kenta a zo boutin etrezo o zrede person. Er verb *bout*, avat, ne vez ket implijet *eo, eu*, en displegadur diberson, hogen *so* nemetken.

3. E brezoneg krenn ha c'hoaz hizio e brezoneg Leon e vez lakaet *i-*, pe *y-*, dirak amzer amdremenet diberson *bout* ha dirak amzer-vreman diberson *monet* :

me a ioa

me a ia.

4. Ar furmou *iel, ielo* ne vezont kavet nemet en amzer da zont diberson ar verb *monet*.

5. An daou zisplegadur kenta personel ha diberson a vez kavet an alies.

6. Ne vez kavet, koulz lavaret, nemet an displega-

dur personel en doare gourc'hemenn. Ar verb en deus eta niver ar ger rener :

An peorgen bezent... soutenet. B. N. 618.

7. En doare-divizout ez eo ivez an displegadur personel ar stanka. Kavout a reer en e raok ar c'hent-verbou *ra pe da* :

Doue d'ho conduo, Q. R.

Doue da roi noz mat deoch, Q. R. p. 14.

Doue do miro ouz pep drouc, Q. R.

Duet mat ra vezy, Gabriel, J. p. 180 b.

Menegi a c'heller avat an displegadur diberson gant ar ger-rener araok *ra* :

Huy ra ve, J. 183 b.

8. Goude ar ger-nac'ha *ne, na*, ne vez kavet hizio nemet an displegadur personel. E brezoneg-krenn avat ez eo luzietoc'h an traou :

A huy na quelef, B. B. 479.

hogen *huy na quet*, J. 147 b.

Ar re nen care, J. 84 a.

A te na cret, J. 74 b.

A te na goar, B. B. 479.

9. Hevelep tra a c'hoarvez goude an darnvuia eus ar stagellou-suja :

Mar emeuz, D. 190.

10. Goude ar rannig-verb *e, ez*, implijet pa ne ze-raou ket an is-lavarenn gant ar ger-rener pe ar renadenn eeun, e kaver an displegadur personel :

parfet ez hoz pedaf, S. N. 269.

11. Pa n'implijer ket *e, ez*, e c'heller e seurt lavarennou kavout an displegadur diberson :

aman me chomo, B. N. 525.

12. Pa vez, araok ar rannig verb pe ragano staga a, renadenn eeun ar verb, e kaver ivez an displegadur personel :

Ne gonn en noar peza graf. B. N. 20.

13. Orin an displegadur diberson a zo e frazennoù evelhen :

Pan ve huy... hon lesse, J. 72 b.

Maz ve te a aznaffe, Cathell.

Mar be huy ve a rahe, B. B. 548.

Tri darvoud 'zo e seurt troiou-lavar : a) ar verb *bout* a zeu da greski al lavarenn ; da skouer en henvrezoneg :

* *is mi a caram* (= karan) ;

b) ar verb *bout* a zo tennet kuit :

e kembraeg : *mi a garaf*,

e brezoneg : *Doue a gar* ;

k) da drede e teu an displegadur diberson da gemer lec'h an displegadur personel :

me a gar.

14. Ar verb « kaout ».

a) Ar menoz « perc'henna » a vez alies merket er yezou keltiek gant troiou lavar, enno ar verb *bout* : *peduar mab ar hugeint am bu*, Kerm. B. Breton p. 150

pevar mab warn-ugent am boe.

b) An troiou-lavar-se o deus roet eur verb nevez e brezoneg, *em eus* m'eo bet taolennet an displegadur anezañ e *Ragano-gour 3*.

k) An displegadur-se a zo peurvuia diberson ; evelato kavout a reer furmou personel anezañ :

1 p. un.

ham bezif e lech *ham bezo*, J. 198 ; S. N. 302, 448.

eil p. un.

he pizy e brez. an « Avocat Pathelin » ; *pizy* a zo e-lec'h *pezo*.

hazuez, Cathol. : *Crist* ;

da vez, M. B. H., p. 20.

uez, *vez* a zo e-lec'h *bezet*, a gaver e *naz bezet*, S. B. 636,

na vezet, S. Cath. 27.

3 p. un.

y ho deuezo. Quic. Ros. p. 171

na deffoto a netra.

1 p. lies.

ur buguel meump ganet, Gw. Breiz Izel II, 496.

a ni hon bemp, Quic. Ros. p. 171.

2 p. lies.

ho peqid, Gr. Ros. Gram. p. 92.

3 p. lies

pliget gant Doue mar e defent, Q. R. p. 171.

ho defent, Greg. R. Gr. p. 92.

d) An ano gwan verb *endevezout*, *endevout* a zo furmet evel *en devezo*. Bez' ez eo e gwirionez eun trede person unan.

e) Furmou all diberson o deus roet furmou personel :

nem deur = « ne fell ket d'in » en deus roet

ne deurvezan quet, Gr. Rostr.

ne deurvan quet, id.

na teurvesit quet, Quic. Rosc. p. 56.

15. An displegadur-c'houzañv a zo d'ezi furmou diberson meneget en taolennou displegadurioù.

An displegadur-c'houzañv personel a zo furmet gant an ano-gwan verb hag ar verb *bout* da verb-skoazell.

10. AR RAKVERB

1. Ar rakverbou a zo gerioù pe strolladoù gerioù a dalvez da gemma pe da spisaat ster neket hepken ar verbou, hogen ivez ster gerioù all.

2. Ar rakverbou-amzeria :

pan = peur ? pegouls ?

hiziu, *hizyu*, *hizyeu*, *hizyo*, *hizieau* ;

vetez, = feteiz.

vet nos, *vez nos*, = fenoz.

breman, *brema*, *breman an pret*, J. 143.

dech ;

an hoaz, *bed an hoaz*,

arhoaz ; — *da penn an hoaz* = adal warc'hoaz ;

oar penn an hoaz = evit warc'hoaz ;

guez aral, *guezall* ;

nebeut a guez ; *liesguez* ; *un-guez* ; *atau* ;

biscoaz (evit an amzer dremenet) ;

bizhuyquen, *bizviquen* (evit an dazont) ;

bet nary, id. ;

pep pret, *pepret* ; *pep dez*, *pemdezh* ;

Quent ; *goude* ;

aguetou, *aguetou*, *aguentoù* = ergentaou ;

heuziquen, *hiuziquen* ;

heulene ;

arre, = adarre

apret ;

ez berr ; *en berr*.

3. RAKVERBOU-LEC'HIA

pe ban ? pe lech ?

ouz knech = ouz krec'h ;

dan knech d'an tnou = eus an nec'h d'an traoñ.

didan, dindan ; endan ;

ma : ma idy ? = « pelec'h emañ ? »

4. RAKVERBOU-PENNABEGI

perac ? pe abec ? pe tra ?

5. RAKVERBOU DOAREA

penaux ?

en mat ;

Evit ober rak-verbou-doarea e lakaer ar rannig ez dirak eun ano-gwan

ez louen, ez mat, ez veo.

An anioù gwan o-unan avat a c'hell ivez beza implijet evel rakverbou doarea :

louen, leal, hag all.

6. Ar rakverbou, an darn vrasa anezo, a zo gwir renadennoù doarea. Setu perak ez eus kement anezo hag a zo, d'an derou, anioù gwan pe anioù renet gant araogennoù :

oar quis = war gil.

a quis yen B. B. 209 = « gant eun doare fall ».

11. AN ARAOGENNOU

1. Evit gwir n'eus ket a gemm dre natur etre rakverbou hag araogennoù. Eur rakverb a deu da veza araogenn pa dalvez da staga eur renadenn ouz eur verb ; eun araogenn a dro da rakverb pa vez implijet he-unan :

a paoue, abaoe = a ba voe ; *a rauc, arauc* ; hag all, a zo araogennoù pe rakverbou.

2. Eun impli eus an araogennoù, tra ar yezou keltiek, a zo bet taolennet e pennad 4. AR RAGANOIOU. Displeget e vezont gant dibenn-gerioù person d'ober renadennoù di-eeun :

Lauar deomp B. N.

Me yel gueneoch-uy, B. N.

D'e miret, rac ne lamset hy,

A eneb e grat, digantaff, B. B. 8.

3. An ober gant an araogennoù a zo unan eus perzioù mat ar brezoneg. Talvezout a reont da binvidikaat ster ar verbou :

a : ez eo a tut prudent, B. N. 205 ;

eux : Ha ma 'z iff deia euz a Breiz, B. N. 71 ;

ouz : Me goulén ouzit, Cath. 5 ;

Ouz an goat real

Ez voe disleal, J. 16 a ;

da : Monet... da (leanes), B. N. 153 ;

diouz : (gopra) diouch an deiz, Cb ;

gant : poultr a ya quant an auel, Cath. 5 ;

digant : Digant Pylat...

Conge de disquenn me mennas, J. 163 b ;

en : Crequiff enn, C.

rac : Quae rac da drem (= « dioustu »), B. N. 87 ;

oar, var : ez due... oar lerch he merch, B. N. 375 ;

digoar ;

oz, o dirak an ano verb :

oz monet, B. Gw. 604.

4. Kemend-all a c'hoarvez gant ar renadennoù diceun a bep seurt :

a : a tra sur, J. 11 b ;

da : renoncaff a graff net

d'an pechet..., B. N. ;

eux : eux ahanen da em tenn net, B. N. ;

ouz : hac ez eu ouz knech ditechet, B. B. 373 ;

gant : gant an den santel reuelet, B. N. ;

voar : ni 'z sezlouo

Voar peñ, hep mar, un guez arall,

An tra se.... B. N. ;

digoar : digoar an maes, B. N. 1307.

5. Evel e meur a yez all, latin ha gresianeg da skouer, ñe vez ket dalc'hmat an araogenn, daoust d'he ano, dirak ar renadenn, pa vez en houmañ, da skouer, eur ger goulennata :

pe a nation ;

pe da cas ;

pe dre hent ;

pe uit re ;

dren marv pe gant ez marvas, J. 64 ;

nep pe gant..., J. 58 ;

na pe gant..., B. B. 273 ;

pe a quen vil maru..., B. B. 489 ;

pe a ban..., Gr.

pe a hyni..., Cb.

pe dre son hiny..., D. 193.

An troiou-lavar se a zo niverusoc'h c'hoaz e skridou ar c'hantvedou war-lerc'h.

12. AR STAGELLOU

1. Stagellou, rakverbou hag araogennou a zo geriou n'heller ket derc'hel dindan eun ano hepken. Evel m'hon eus lavaret endeo, eur rakverb a c'hell beza

a-wechou all eun araogenn. An araogennou a c'hell beza strollet gant stagellou d'ober stagellou nevez.

2. Diforc'h a reer stagellou kenlavarennia :

a, ha, hac, ac,

na, nac,

uez,

hoas, hoaz,

eguit,

couls goude,

rac.

3. Hag ar stagellou is-lavarennia :

a) ma ; guellaf ma'z gallen ; ma'z compso ;

rac ma : rac mazedouf ;

eguyt ma : eguyt maz duy ;

seul ma : seul maz vezaff ;

oar abec : « en abeg ma ».

palamour da (caret) ;

dre ma ;

b) na : me a preder na viziff ;

dre na : dre naz eux ;

rac na : rac na hoarfe goall ;

k) mar, ma : mar doude ; ma ne gouzyech ;

e) pan, pa : pa'n petes ;

pa na : pa na ve huy ;

13. GWERZAOURIEZ AR BREZONEG-KRENN

1. Barzed Breiz ne raent ket hepken gant kloten-nou dibenn gwerzennou, hogen ivez gant klotennou diabarz.

2. Barzed Kembre a ra eus an doare gwerzaoua-se

kenganerez. Lies doare kenganerez o deus. An hini implijet gant barzed Breiz a zo heñvel ouz o c'henganerez lusk :

Caryat didwyll a grybwyllaf.

3. Sed amañ penaos e tistag Erwan Berthou lezenn diazez ar werzaouriez-se, en e levrig *Kevrin Barzed Breiz*, p. 34 :

Ar silabenn eil-diweza eus ar werzenn a zo klotennet dalc'hmat gant hini ar rann-veur pe trouc'h gwerzenn ; gallout a ra beza klotennet gant rannou all c'hoaz :

Itron clouar, guerches Mary,
Duet guen-comp glan da Bethany.

4. Emil Ernault a zistag al lezennou-diazez evelheñ :

(1) Silabenn eil diweza ar werzenn a dle klota gant eur silabenn pe veur a hini oc'h echui eur ger, pe c'hraet gant dibenn eur ger ha derou an hini warlerc'h. Mar deus eun trouc'h-gwerzenn ret, e rank beza unan eus ar c'hlotennou se.

(2) Silabenn diwez diou werzenn genta eur c'houblad a dle klota gant silabenn eil-diweza an trede gwerzenn, ha silabenn diwez ar pedervet ha pempvet gwerzenn gant silabenn eildiweza ar c'houec'hvet :

-Goude da stat ha pompadou
Guyscamant ha paramantou
Ez duy an Anquou loven,
Pan troy en-haf, da lazaff mic
Maz duy da neuz da bout euzic
Ha tristidic da bizhuyquen

B. M. 227.

5. Gwerzennou ar brezoneg-krenn a zo enno peder,

pemp, c'houec'h, eiz, dek, daouzek, c'houezek ha zoken ugent silabenn :

4. Secret bezet. —

Na doutet quet, J. 19 a.

5. *Dre'n guerches dinam*

En deffoe da mam

Doe en dilammas. J. 4 a.

6. *Quae, lavar hegarat*

Da mam clouar Mary

Ez ouf ressuscitet. J. 180 a.

8. *Me yelo breman voar an glenn*

Ma hunan breman ahanenn. B. N. 41. 42.

10. *Ne gallaf tam, en diablam, da amouez ;*

Chede pez froez a douc moez an ploe ! J. 120 b.

12. *Ael mat quae en stat man a breman voar an bet*

B. N. 1.

16. *Pan em requet da monet dy, me yel guenoch-uy*

[continant.

B. N. Chrest. Br. p. 247.

20. B. N. v. 233. 234.

6. Hervez an Ao. Loth ar gwerzennou herr a seblant deut diwar ar re hir ha ne dint bet moarvat da genta nemet darnou anezo, deut da veza gwerzennou war o fenn o-unan, en abeg d'ar glotenn diabarz. An dra a zo anat evit ar gwerzennou eiz ha dek silabenn pe-gwir n'eus anezo, e lod eus ar skridoù manet betek ennomp, nemet trouc'h-gwerzenn eus gwerzennou c'houezek pe ugent silabenn.

7. Er skridou roet da heul ar yezadur-mañ, arabat beza souezet mar ne gaver ket reolennou gwerzaouriez ar brezoneg-krenn miret-striz. Lod anezo a zo bet yaouankaet pe displeberet e doare pe zoare gant ar re o deus o eilskrivet.

8. *Tragedien sacr* J. Cadec, beleg a vro Dreger a zo ar barzoneg diweza ma kaver ennañ levezon gwerzaouriez ar brezoneg krenn. An oberenn-se a zo eus 1651.

STERENN

Boîte Postale 75, Brest

Kelaouenn vizek

Renner : Roparz Hemon

Priz : 100 lur ar bloaz

Kas an arc'hant da

L. NEMO

110, Boulevard de Metz, RENNES

(CC. 121-10, RENNES)

Priz an niverenn : 10 lur